

free

IMBROURCH



un hent
a garan



pe a zigoran



kelaouenn

bolitikel

niv.

K E M E N N A D E N N

Dont a ra an niverenn-mañ eus IMBOURC'H er-maez gant ur mizvezh dale a-benn lakaat ar bloavezhiaed kourmanant da gregiñ e miz Genver ha n'eo ket e dibenn miz Kerzu. Pedet eo eta ar goumananterion da gas o adkourmanant ur wech m'o devo degemeret an niverenn 12 deiziadet eus an 31 a viz Kerzu 1970. Pep bloavezhiaed a zalc'ho evel-se 12 niverenn a vo skeuliataet etre an 31 Genver hag an 31 Kerzu.

Kouhañ a reomp ez eo IMBOURC'H ur gelaouenn a studi digor d'an holl. Evit danevellañ ha dezrannañ obererezh E.B.V. e tremmer ouzh savidigezh ur c'hannadig a-ziforc'h en dazont hag a vezo dar-naouet dre hanterouriezh an trevioù.

DARVOUDOÙ AN DEIZ :

Douaridigezh ur vroad

Mat eo, a gav deomp, prederiañ a-wechoù diwar-benn an darvoudoù a c'hoarvez endro deomp er bed. N'eus ket pellzo em boa taolet evezh ouzh tremenvan ha douaridigezh Nasser. Ha setu Charles de Gaulle o vont d'e dro da anaon. Hag anzav a rankan ez on bet bamet adarre gant an "doueadur" a zo bet graet eus an obidoù-mañ.

Stourm an Emsav ha n'en deus lec'h ebet er bed politikel evit ar poent - se zo anat a-walc'h - , a zo dister ha dic'halloud, dihwel ha kuzh koulz lavaret, a ro tu da unan, da vihanañ, da zougen ur varnadenn yac'h a-zivout tud ha darvoudoù zo.

N'eus ket anv, eveljust, a nac'hañ roll ha pouez D.G. en istor e vro end-eeun. Moarvat n'eus ket bet anezhañ e nep doare ur rener brezel (pezh a hañvalo bezañ iskis evit ur "glevgadour"); n'en deus ket dieubet e vro e unan o kemer penn ul lu broadel (gant an Amerikaned eo bet dieubet Bro-C'hall hag ar C'hallaoued n' o deus graet nemet reiñ un taol skoaz dezho) ; n'eo ket bet gouest kennebeut da virout an impalaeriezh c'hall ; ha moarvat n'en deus ket tizhet kennebeut all da ziogeliñ un dishualded c'hroñs d'e vro daoust d'ar vombezenn en deus fellet dezhañ pourchas d'al lu gall.

Evelato e c'hell ar C'hallaoued bezañ anaoudek ouzh o rener e meur a geñver. O tifoarañ an impalaeriezh - pa ne c'helle ket ober a-hend-all ha marteze ivez dre ur marc'hed bennak a frankizouriezh - en deus D.G. gouezet tennañ un trec'h speredel eus ur faezhidigezh danvezel didec'hus : o vezañ ma felle dezhañ diorren e vro - pa ne vije bet nemet evit gellout kevezañ gant an Alamaned a vije deuet da vezañ a-hend-all pennañ galloud armerzhel Europa - ne c'helle ket war un dro kas da benn vat brezelioù trevadennel ker spontus evit ar vroad etre ez eo deuet Bro-C'hall da vezañ.

War ar mare'had en deus espermet D.G. div wech ur brezel diabarzh rivinus d'e vro : e 1944-45 p'en deus miret ouzh ar gommourion - lakaet o dije soñjet a-zevri e kemer-se - kemer ar galloud e Bro-C'hall ; - hag e 1958 p'en deus paret ouzh ar faskourion c'hall a gemer d'o zro penn ar Stad c'hall ; ouzhpennomp en deus gouezet ivez tennañ ar C'hallaoued diguzh an enkadenn dall eus devezhioù miz Mae 1968. Evit kement-se holl ez eo reizh e vagfe ar C'hallaoued - ar vourc'hizion ha bourc'hizion vihan c'hall, ar pep brasañ eus ar boblañs e gwirionez - anaoudegezh vat ouzh Charles de Gaulle eta.

Padal, gant D.G., moarvat, eo marv ar Vro-C'hall a bade abaoe pemp kantved bennk ; ha dre ma vezent emichañs o oa echu o zremened impalaerel eo o deus graet ar C'hallaoued hevelep o'idoù meurdezhus ha brazonius d'o rous diwezhañ.

Darn, e Breizh, a zo bet feuket gant an apoteoz-se, gant an enorioù doueel-se - daoust d'o fals eueded - a zo bet graet d'un den. Hogen kompren a ran ar C'hallaoued en ur stumm : ar re-mañ o deus ur skiant lemm eus o istor, eus pezh a zo bet meur ennañ, ha ma c'hellont bezañ trevariet a-wechoù o reiñ d'o stad ha d'o sevenadur ur ster doueel koulz lavaret ha oc'h ober eus an den a enkorfe anezho un deare doue, e ranker degomer daoust da se he deus ar skiant-se eus meurded o broad o harpet da gas da benn en istor ur gefridi hep he far : mat pe fall, stummet eo bet an hollved dre berzh ober ar C'hallaoued. Salv e teufe ar Vrezhoned da gant kement a fiziañs en o zonkadur ha m'o deus bet ar C'hallaoued en o hini !

Ne betan ket evit keloù se, na petra, e trevezfe ar Vrezhoned ar foud e deus diskouezet ar C'hallaoued kaout a-hed o istor hag he deus degaset anezho meur a wech da vezañ mac'honorion eus ar gwashañ net peogwir ez eus anv a veurded e karfen lakent an Emsaverion da enozañ ivez ouzh meurded o labour. Emaint er mare-mañ oc'h nozañ diazezoù ur sevenadur nevez ha moarvat e plegennoù kalc diazezoù egot kalc pobloù war an douar. Un den evel D.G. n'en doa talvoudegezh "mare'had" ebet ; ne fell din lavaret n'en deus

graet nemet mirout betek ar mare diwezhañ ur peadra a oa bet fiziet ennañ, ur sevenadur a zo oc'h ober e dalaroù hiziv ha tonket dezhañ mont da get ; D.G. n'en deus krouet netra. Ar re a grou avat a zo stourmerion diguzh ha divrud, a varv a-wechoù hep ma klevfe ar bed distagañ o anv ; ar re-se a zo deraouerion hag ar bed ne oar ket ez eus anozho ; ha padal int, bepred, a ro un dremm nevez d'an douar-mañ.

An Emsaverion a zo e-touez ar re-se. Kemerent kalon eta ; pep hini anezho a dalvez muioc'h egot paotred ar c'hoariva politikel a blantor hep dale el lab evel kinkladurioù dic'hizet.(1)

Y.O.

LIZHIRI

"N'on ket a-du gant an tuadurioù en em ziskouez ebarzh Emsav abaoe 1969 met kavout a ran ez eo un dra vat e klaskfe E.S.B. un hent nevez, ur gweladur nevez... Ali on ganto diwar-benn diazezoù an Emsav hag ivez diwar-benn ar "Praxis" (an Emsav zo da vezañ buhez, al liam poellek da virout etre kelennadurezh, pal hag oberoù) met a-hend-all em eus disfiz ouzh an damkaniezhoù hollek ha ne gradan ket ez eus un diskouid hollek d'ar c'hudennoù (nemet relijiel e vefe) ; stag on ivez ouzh lieselezh an Emsav.

Lenn a ran Imbourc'h gant aked bep miz ; ali on ganti war veur a graf. Ne on ket ali ganti evit pezh a sell ouzh an isdioreadur pe, kentoc'h, asantiñ a ran d'ar c'hlozadur hogen nebeutoc'h d'ar memzioù displeget ebarzh ar pennad. A-wechoù on ali a-grenn gant ar memzioù (Stad ha sevenadur) met kavout ra din n'eo ket bet dibabet mat atav ar skouerioù (ar brotestanted, da skouer) met re hir e vefe menegiñ an abegoù rak alies na vez keal nemet eus munudoù.

A-du on evit herzel ouzh levezon ar varksouriezh ; keff-erinañ a rafen anezhi ouzh levezon ar faskouriezh er bloavezhioù 1930-1944 hag on am eus e vefe ar c'hiz nevez ken drastus hag ar c'hiz kozh ! Met ur men relijiel eo ar varksouriezh e gwirionez ha d'am mono na ro ket diskoulmoù da gudennoù kevredadel hag armerzhel a-vremañ. N'eus nemet studiañ ar renadoù sokialour. Soñjal a ra din he deus c'hwitet ar varksouriezh rak ar renadoù en em ziskleir marksaour n'o deus ket dieubet an den ; onon a reont ivez war-lerc'h ar riezoù kevalour diarreket ; deuet int a-benn koulskoude da grouiñ armerzhioù broadel ha da luskañ anezho war hent an dioreadur..." S.K.

(1) N'eus ket anv ganeomp eveljust a nac'hañ perzhioù denel D.G. A zo bet un den reizh, war a haval, daoust ma na oa ket, a soñj deomp, ar sant a garfe lod ober anezhañ.

KEBEG HA BREIZH

Soñj o deus an holl moarvat penaos e voe goloet mogerioù meur a gêr a Vreizh, daou vloaz bennak a zo, gant enskrivadurioù a lakae Breizh ha Kebeg keñver-ha-keñver hag oc'h arc'hañ ar frankiz, na petra, evito o div, hervez komzoù entanet ur jeneral brudet, broudet gant an awen a c'horre pondalez ti-kêr Krec'h-ar-Roue. Evel-se eta ne vefe ket fall ensellout peseurt darempred a c'hell bezañ etre Breizh ha Kebeg ha war un dro dougen ur varnadenn diwar-benn degouezh ar F.L.Q. hag an dispac'h ar-fell da zarn kas da benn el ledenez -mañ.

Gwiriañ a c'hellomp da gentañ o deus Kebegiz kalz nebeutoc'h da glemm eget Breizhiz : tizhet o deus a-viskoazh pezh a c'houlenn ar MOB, lakaomp, evit Breizh abaoe 13 vloaz. Skoliet eo Kebegiz en o yezh adal ar skol elfennel betek ar Skolioù-meur ; en o yezh ivez o deus kelaouennoù e-leizh, pemdeziek lod anezho ; kantadoù a levrioù a vez embannet bep bloaz en o yezh. War ar marc'haden em vataont eus ur stad rannvroel a zo ec'hon meurbet hec'h arc'hwelva hag he barregezh, a vez tremenet zoken d'ur riez gant gouarnamantoù leun a zamant outi evel hini Bro-C'hall. Ha dre vras a-hend-all e rankomp anzav o deus ar Saozon diskouezet kaout kalz mui a istim evit Kebegiz hag o yezh eget n'o deus ar C'hallaoued diskouezet kaout evit ar Vrezhoned hag o yezh ; e berr gomzoù, nepred n'o deus ar Saozon klasket a-zevri kaer distrujañ yezh ha broadelezh Kebegiz.

Degouezh Breizh avat, dindan gouarnerezh ar C'hallaoued, a zo disheñvel a-grenn. Dre heg, hep ma vije goulennet ali ar bobl, ez eo bet dilamet aspadennoù diwezhañ hon emvelstrezezh ; n'o deus ar C'hallaoued roet d'hor yezh chañs ebet da zreistveañ ; pa oa hon armerzh en o c'hiriegezh o deus he lezet da goazhañ ha da zizeriañ. Ha setu an dispac'h : a-boan ma vez embannet un nebeut kelaouennoù hag un nebeut levrioù bep bloaz en hor yezh,

al lod brasañ anezho liestennet ; ha da ziskoulmañ kudenn an isdiorreadur e Breizh devoudet ganto o unan n'o deus kavet ar C'hallaoued da louzoù nemet skarzhañ diouti hec'h annezion.

Moarvat e ouzomp e chom arvarus emgav ar c'hallegerion er C'hebeg daoust d'an holl vrientoù o deus e-keñver Breizhiz, o vezañ maz eo gwasket houmañ gant pouez an armerzh kouezhet e dalc'h ar Saoznegerion a Kanada pe ar Stadoù-Unanet. Evel-se eta e kredomp ne zuy Kebeg a-benn da bellaat ar riskl-se nmet dre sevel ur stad vroadel dishual a c'hell, pergen, reoliñ an armerzh ha mirout outañ a gas da get kenglad speredel Kebegiz (hag evit an hevelep abegoù - ha gant kalz muoc'h a reizh en arbenn a'r gwallstad m'emaomp enket enni - e kav deomp ivez e tile Breizh ivez kaout ur riez emveliek ma fell dezhi addont da vezañ ur vroad hag adsevel he yezh, he sevenadur hag hec'h armerzh).

Hogen, dres, daoust ha paliou seurt-mañ hepken eo a zo re ar F.L.Q. en deus sammet kiriegezh skrapidigezh ha muntridigezh ar mavdiern kanadat-gall Laporte ? War a hañval, n'eo ket ar paliou-se ar re nemeto nag ar re bouezusañ evit renerion an talbenn-se ha n'emañ ket e unan war an dachenn, a-hend-all, oc'h arc'hañ an dishualded evit Kebeg : ar "Parti québécois" a fell dezhañ gounit frankiz ar vro dindan al lezenn a vuk an hevelep pal ha dastumet en deus, egiz ma ouezer, 23% eus ar mouezhioù en dilennadegoù diwezhañ.

E degouezh ar F.L.Q. eta hon eus afer ouzh ur stroll "araogelour" ha "kleizelour", en em savlec'h e framm an dispac'h sokialour etrevroadel da gas da benn er bed a-bezh, hervez pepnaennoù ar "varksouriezh-leninouriezh" ha dre hent ar feulster ; er c'heñver-se en em gav enebet ouzh ar strolladoù komunour klasel reolet gant Moskov a chom hiziv peurvuiañ lezennelour hag a zo tamallet da vezañ "kempennelour" en abeg da se gant patred ar gwallnerzh dispac'hel. Ar re-mañ, a-hend-all a gemer da batrom Kuba hag ar broioù isdiorreet eus Amerika ar C'hreisteiz ma klaaker seveniñ enno un dispac'h diouzh giz Kuba end-eeun.

En abeg da implij ar gwallnerzh boutin d'an daou rumm e c'hellfed keñveriañ ar "gleizelourion" a seurt gant re ar C'hebeg, da skouer, ouzh anarkourion deroù ar c'hantved (kounomp ar muntroù sevenet gant ar re-se neuze) pe re Gatalounia e-pad brezel Spagn. Hogen un diforc'h a-bouez a ranker ober etre ar re-hont hag ar re-mañ, dre ma ra an "araogelourion" dave peurluviañ d'ar gelennadurezh marksat-leninat reizh-kredennek, a vije bet, gouez dezho, dilezet gant mistri ar galloud e Rusia a vefe prest, hervezo bepred, da lakaat a-gostez mennad an dispac'h hollvedel ha d'en em glevout gant an Amerikaned diwar goust holl bobloù gwasket an douar(1).

Lavarout a rin da gentañ e komprenan a-walc'h e vije bet dedennet emsaverion zo gant an "araogelouriezh" diouzh ma c'hrata kas da vat un dispac'h klok ha na c'hell bezañ tizhet d'ar c'hentañ sell nemet en tu-hont da zistrujidgezh ar Stadoù bourc'hiz gwasker. Meur a hini e Breizh en em c'houlenn, eveljust, ha talvezout a ra ar boan ober un dispac'h e Breizh evit diazezañ en diwezh ur gevredigezh a vo heñvel mik ouzh an hini c'hall bourc'hiz. D'ar predor-se e tamantan moarvat. Hogen daoust da se ez eus tro da ziskrediñ e kemerfe ar re yaouank an hent mat evit diraez o fal pa zibabont da gelennadurezh politikel an "araogelouriezh". Rak houmañ a c'heller burutellañ e meur a geñver diouzh an termenadur a roer peurluviañ eus palioù an Emsav hag ivez diouzh ar c'hempocll a zlefe bezañ enni hec'h unan. Ha d'gentañ e ser an hollvedelouriezh a zo e diazez an emsav "araogelour": ne gont ket deomp, e gwirionez, ez eus tu da gas da benn un dispac'h hollvedel - a zisoc'hfe n'eus forzh penaos d'ur brezel hollvedel atomel - hep en em harpañ war ar Stadoù sokialour, mat pe fall - da soñj an "araogelourion" - a zo bet diazezet endev. Adal m'en em lec'hier er par etrevroadel e politikerezh e kouezbar diouzhtu e konstok ar bloc'hoù. Se zo

(1) Estreget marksourion a zo eveljust e-touez ar "gleizelourion" hag ar re-mañ a-hend-all a zo fannet etre meur a postezenn hogen ar re n'int ket marksourion rik n'int nemet ambrougerion el luskad-mañ, a gav deomp ha n'o deus ket perzh da vat e termenadur he politikerezh.

lavarout war un dro ez eo dibocll enebiezh an "araogelourion" ouzh Rusia diouzh o savboent-int o unan (rak gwel eo ur sokialouriezh peuzvat eget tamm sokialouriezh ebet) hag ez eo ken dibocll all ar fiziañs a lakaont e Sina evit degu abeg : ken broadelour ez eo Sina ha Rusia hec'h unan ha ken impalatrelour hag hi ; an etrevroadelezh ned eo eviti nemet un digarez hag un tu da astenn he levezon ha da greskiñ he galloud diwar goust an Amerikaned hag an impalaeriezh varksat c'hoar, evit arbennoù a gevezerezh kevandirel kalz mui eget evit arbennoù a gelennadurezh politikel rak anat a-walc'h ned eo glanded ar gelennadurezh varksat sinaat nemet eztaoladur he dic'halloud da zienkañ hec'h armerzh ; hag ouzhpennomp, da eil, ne c'hellfe Sina c'hoari he roll hollvedel nemet e degouezh he zrec'h diwar goust Rusia ar pezh na c'heller ket nemeur empennañ o vezañ ma ne zisoc'hfe kement arnod eus Sina da gaeañ Rusia nemet da gevrediañ ar Stad-mañ gant Amerika : ha, betek gortoz, ne vo ket gouest Sina abarz pell da dalañ ouzh an div impalaeriezh veur-mañ, bras dreistgoñvor o galloud, war un dro.

Diouzh savboent an Emsav e verkin bremañ kement-mañ. En em c'houlenn a c'heller ha kempocll eo ar c'healiad marksat a zo degemeret dre vras gant an "araogelourion" gant hini an Emsav, e keñverioù zo da vihanañ. Keal an dispac'h marksat, da skouer, ne c'hell bezañ komprenet nemet e par ar stourm etrevroadel a-enep d'ar gevralouriezh hag hemañ ne c'hell ober berzh nemet gant harp an impalaeriezhoù marksat diazezet endev. Maz eo ar stourm emsavel avat ur stourm enep-impalaerelour hag enep-stadelour da gentañ penn, o tennañ da lemel arallekadur armerzhel ar renadoù kevalour koulz hag arallekadur politikel (1) ar renadoù "marksat" na weler ket penaos e c'hellfe an Emsav degemer mennadoù an "araogelourion" varksat, impalaerelour ent digor pe zirgel, hep en em renaviañ e unan. Pezh a zo eta danvez an dispac'h emsavel a rank trehentiñ war un dro ar sevenadurioù bourc'hiz ha "proleterat" ha n'int ket diforc'h a-grenn an eil diouzh egile : e gwirionez e kemeront o daou da uhelpal mostromiañ an hollvad hag o daou ivez e lakaont da

(1) Adlavarout a ran n'hon eus ket da zerc'hel kont eus mennadoù mat marks, yaouank pe gozh, hogen eus ar renadoù marksat a anavezomp, pargen e refer Europa, Yougoslavie lakaet a-ziforc'h.

benntalvoud an efedusted danvezel ; o daou, erfin, e tisoc'hont dre hentoù disheñvel da sevel stadoù hollveliek e stumm pe stumm hag impalaeriezhoù divent a c'hell hepken aotren dezho kas da wir o huñvre a hollc'halloud denel(1)

Ma fellfe d'an Emsav avat heuliañ ur politikerezh kleizelour marksat e rankfe goulenn sikour Sinaiz pe Sina-garourion, lakaomp ; ha ne weler ket penaos na vefe ket levezonet gant kealiadoù an impalaeriezh varksat-se. N'eo ket abalamour ma toujan ez emellfe Sinaiz war-eeun en aferioù Breizh (gwall bell emaint!) - hag eveljust ne gomzan ket eus an eneberezh a vefe broudet e Breizh, e Bro-C'hall pe en Europa dre vras e-giz m'emañ gant seurt politikerezh - hogen peogwir e vefed war var,oc'h heuliañ an hentenn-mañ, da zegas en Emsav kealiadoù a zo bet bet aozet evit ezhommoù un impalaeriezh hag estren ouzh ar vroad vihan a fell da Vreizh bezañ. An dra-se a zo c'hoarvezet endev etre an daou vrezel pa reas emsaverion zo ur c'hlaoustre a-du gant trec'h ar stadoù impalaerel faskat a zlee diskar ar Stad c'hall ha degas dillooc'h ar frankiz da Vreizh ; en un doare natur e oant bet degaset da zegemer mui pe vui kealiadoù ar stadoù impalaerel-se. Kevend-all a c'hoarvezfe hiziv gant ar vrogarourion a rafe klaoustreoù gant trec'h un araogelouriezh a zlefe - amsat - diskar ar Stad c'hall : derenet e vefent da advabañ mennoziadegoù ha n'o defe netra da welout gant gwir saviad Breizh.

Lavarout kement-se n'eo ket barn an dispac'hoù bourc'hiz ha marksat o doa ur roll da c'hoari en istor an hollved - unan ha na c'hell ket bezañ dalc'het gant an Iliz da skouer -rak mestroniadur an hollved ha lamadur rediezhioù an danvez a zo ur mad diouzh ma tennont da bourchas da vab-den moziou e rezid, hepmuiken. Hogen goude anzav kement-se e

(1) Nag an dere'hanijinerezh nag imbours'hadur an egor - un ombregadenn arouezenus eus ar sevenadur arnevez nag ar stlennataerezh ned int diouzh galloud na moziou broad vihan ebet ; ar reverzhi stlennatael ne c'helle bezañ kaset da benn nemet e riezou impalaerel divent evel ar Stadoù-Unanet. Ar gudenn a chom eta a c'houzout peseurt sevenadur nevez a fell d'an Emsav degas d'ar bod. Bezet pe vezet ez eo danjerus bopred implijout yezh ar re a zo estren hag anebet ouzhimp.

rankomp embann e trehont an dispac'h a fell d'an Emsav kas da benn el ledenez-mañ an dispac'hoù bourc'hiz ha marksat. E bal n'eo ket distrujañ ar Stad evel Stad - pezh n'en defe ster òet - hec'h azasaat ouzh mab-den, he dihadañ, he disakrañ, ne lavaromp ket. Azasaat ar Stad ouzh mab-den avat a dalvez, da gentañ, krennañ he ment hag he galloud, da lavarout eo, diskar ha bruzhunañ an impalaeriezhoù ; anv ez eus, en ur ger, a seveniñ dizeriadur ar Stad a zo bet diougant gant ar varksourion evel un anadenñ natur hag un emdroadur didec'hus hogen na vo kaset da wir, evel pep dispac'h, nemet dre youl ha rezid mab-den : rak dispac'h ebet n'eo bet sevenet gant mistri ar galloud. Kroaziañ avat war al lorc'h impalaerel - a zo armerzhel da gentañ - a zo koulz ha degemer ne c'hell ket an diorreadur hag an efedusted bezañ diharz hogen e ranko mab-den deiz pe zeiz, ma ne fell ket dezhañ bezañ distrujet gant e grouadennoù, lakaat bevennoù dezho ha dioueriñ, n'eo ket moarvat an hoal-vat ha kement mad a zo diwanet diouzh ar reverzhi c'hreantel hogen ar galloud e unan a zo deuet da vezañ dreistdenel hag ifernel koulz lavaret.

Gwelout a reer eta ne glot ket war hir dermen an dispac'h emsavel gant an dispac'h araogelour ; war verr dermen avat ne gav ket deomp kennebeut e klot hentennoù ha doareoù-ober ar "gleizelourion"-se gant ar re a ranko bezañ implijet gant an Emsav.

Kontañ a ra kalz an "araogelourion" war implij ar feulster evit tizhout o mennadoù hag, ez pleustrek, e c'heller gwiriañ en em gemesk implij ar feulster gant ar sponterezh nemetken. Anat e oa end-eeun er C'hebeg paz eo bet dalc'het ar maodiern Kanadat-gall P. Laporte prizoniad e-pad neur a zevrezh gant ar F.L.Q. ha drouklazhet war-lerc'h hep marc'had ebet evel ul loñn.

Un dra a fell din rezizañ da gentañ. N'eo ket feulster an dispac'herion a ranker tamall dreist-holl hogen hini ar Stadoù diazezet a-ziagent. Amere a-walc'h eo, da skouer, brouez vertuzus

paotred ar galloud e stadoù zo a guzh o dremm gant ar vezh hag a zo prest diouzh o zu, a-hend-all, da implijout armoù holl zrastus, derc'hanel pe gimiek pe vevoniel evit distrujañ en o fezh poblañsoù an impalaeriezhoù enebour a gantmilionoù(1).

Diouzh un tu all ez eo ret mat stadañ n'en deus ar stourmer dispac'hel - ha zoken ebarzh impalaeriezhoù zo evel en Unvaniezh soviedel - saviad na gwarant dezvel ebet evel m'en deus soudard ur Stad diazezet er brezel, da skouer. O lakaat al lezenn voutin da dalvezout evitañ egiz evit un torfetour ordinal e laka ar Stadoù diazezet ar stourmer-se e-maez lezenn ha dre se e serront o unan kelc'h ar sponterezh hag ar feulster. Gwelle vefe eta d'ar Stadoù diazezet empennañ un dezvad evit ar stourmer dispac'hel evel maz eus bet ijinet unan e meur a vro evit nac'herion al lugwazerezh. Se zo anat e degouezh Kanada end-eeun e-lec'h ez eo bet devoudet feulster foll izili ar F.L.Q. gant toullbac'hidigezh o c'henstourmerion.

E ser an darvoud-mañ e karfen ensellout arver ar feulster dre vras. Darn en Emsav zoken a zremmfe a-walc'h ouzh implij ar gwallnerzh en anv un "divezouriezh" a santela n'eus forzh peseurt hentenn dre ar pal ez eo ar stourmer mennet da dizhout. An "divez" eo a dermen ar mad hag ar fall ha seurt kelennadurezh a zo darbennet ent ezhleg gant ar varksourion dre vras (ha gant meur a rumm all a viskoazh).

Ar sturienn-mañ n'eo ket reizh d'hor soñj. An ober politikel ne zle ket bezañ meizet hepken e-par ar pal a zo da dizhout hogen ivez e par ar stourmerion a seven anezhañ hag a zo gwezhourion an ober politikel. Gant gerioù all, an hent a gas d'ur pal a zo ken pouezus hag ar pal e unan ; pelloc'h ez in zoken : n'eus diforc'h ebet etre ar pal hag an hent d'e dizhout ; rak ur sevenadur ne c'hoarvez ket hepken eus mennadoù 'divezel' ar re o deus sammet ar groudigezh anezhañ hogen eus an tudioù, ar mozioù hag an doareoù a implijont war wel ar pal-se.

(1) Seurt lazhadegoù ne feukont ket kement dre maz int "dibersonel". Ha padal peseurt keñver a zo etre al lazhadegoù-se dreistfaltazi (ra soñjor e bombezadegoù ar brezel divezhañ en Europa hag er c'hevandirioù all) hag ur suntr digonvez evel hemañ ?

Ha ma lakaer ar mac'homerezh - lakaomp - da venveg krouiñ ar sevenadur e krouer a-benn ar fin ur sevenadur mac'hom ha dizenel : kement-se a zo c'hoarvezet dres e Rusia p'he deus dibabet ar vro-mañ hent ar stalinouriezh.

Arabat e vefe deomp krediñ eta e c'heller ober n'eus forzh petra evit ne vern petra ; ar mozioù a rank atav bezañ azasaet ouzh ar finvezhoù. Elese, ne c'hell ur vroad pe un emsav implijout ar gwallnerzh nemet e par an emzifenn, pa glask ar galloud mac'hom e unan o distrujañ pe neuze pa nac'h'outo a-grenn o gwirioù ha pa ne chom mui nemet an hent-se d'an emsav pe d'ar vroad d'o zizhout. Daoust hag an ampleg-mañ en em gav hiziv e Breizh pe er C'hebeg ? Ne gredomp ket. E Breizh, pergen, n'eus bet arnodet a-zevri biskoazh, da skouer, adsevel un Emsav digor ; abarzh m'o devo ar Vrezhoned ar gwir d'en em sevel e vo bet ret d'ar renad gall bezañ esaet diskar anezhañ dre heg.

Ken dañjerus all e vefe avat faltaziañ e c'hell ar feulster ober berzh bepred. Padal ne c'hell dont a-benn nemet ma vez implijet a-enep da ouarnerezhioù a zouj ar frankizouriezh : peseurt chañs da drec'hiñ o deus ar pobloù a zo e dalc'h ar Rusianed oc'h en em sevel, e Lituania, er broioù baltek dre vras pe e broioù Europa ar Reterkerkoulz all evel Tchekia ha Slovakia ? Ha c'hoazh, e degouezh ar Stadoù frankizour evel U.S.A. pe Breizh-Veur, ne bleg ar renadoù-se d'ar feulster nemet diouzh ma ne c'houlenn ket an emsavid aotreadurioù a c'hellfe lakaat en arvar diogelroez o riezoù : biken ne blego an Amerikaned da lezel Sinaiz pe Rusianed d'en em staliañ e Kuba, da skouer.

E degouezh implij didec'hus ar feulster zoken ne c'heller ket arverañ ne vern peseurt gwallnerzh. Hemañ ne c'hell kaout da amkan nemet dihuniñ an emsiant bobl ha frammañ ar vroad ha n'eo ket trec'hiñ ar Stad m'eur enebet outi. Evit tizhout an amkan-se avat ne rank ket ar feulster bezañ dall ha kriz hep ezhomm. Gant ar vuhezerezh a zo hec'h hini ne vo ket dedennet hor pobl gant ar vourrevion a vuntr hep abeg un den dizifenn, gant an harozed en em laka war var da goll o buhez en un emgann leal no i v ran ket v.t.

Darn - touellet moarvat gant n'ouzon pe follentez - ne brizont nemet al loustoni evel an hent o kas d'an trec'h. Ne gav ket din avat e vo kavet ar seurt-se e gouenn ar Galted.

Y.O.

LIZHIRI

"Er-maez eus an dud n'eus netra e politikerezh. Ar mennoziou o unan n'int netra hep an dud a ro korf dezho, en em gann evito hag a zifenn anezho. Breizh ne dalv un dra bennak ha ne vev nemet diouzh ma tougomp anezhi ennomp ; en hon askre emañ he nerzh.

Ar peurrest n'eo nemet marvailh goulo. Na c'hortozit ket un haroz all o tont eus an tremened pe eus ur blanedenn all. Ma vije marv Vallee a-raok ar c'houlz ne vije bet GERIADUR BRAS ebet, setu holl. Hep Roparz Hemon ne vije bet GWALARN ebet, na lennegezh vrezhonek arnevez ebet. Hep Ronan Huon ha Per Denez, AL LIAMM n'en dije bet bevet ; ne vije bet lennegezh vrezhonek bev ebet en deiz a hiziv. Hep Debauvais hag hep Mordrel ne vije bet tamm BREIZ ATAO ebet ha kement a zevas da heul.

E kement lec'h ma taolan va selloù en tremened pe war va zro hiziv e welan tud ha n'eo ket mennoziou pe galianoù, goude ma ve hini ar "bobl" a yafe war-raok drezo o unan. Kement-se n'eus ket anezhañ. Arabat eo deomp bezañ toulllet gant ar gerioù.

Hor mennoziou ne dalvezont ha ne dalvez an Emsav nemet ar pezh a dalvezomp-ni hon unan. Hiniennelezhioù eo a grou an'Istor, a zeu a-benn eus an Tonkadur, netra ken rak Doue en deus graet ac'hanomp rez.

Stummañ tud, hemañ a zle bezañ hor pal kentañ, hor pal pennañ ma fell deomp dreistveañ ha trec'hiñ.

"Roit din mil den desavet diouzh ar stuz gouezelek" a lavare Padraig MacPiarais"ha digabestraf a rin Iwerzhon. Roit din kant diouto, roit din dek diouto..."

Dek den, marteze, a vefe a-walc'h, ma vefent stummet en un doare azas. Gant kant den omp sur da zieuñ hor pobl...

Biskoazh Breizh n'he deus bet hevelep nerzh diouzh he grad abaoe gwechall gozh. Pet pobl o deus bet biskoazh hevelep nerzh ? Anna Vreizh a oa hec'h unan pe hogos ; Landeiz a oa e unan penn.

A bepred o deus gallet ar wir emgannerion en em gontañ war -bouezbiziado daouarn. Kement-mañ a skrivan evit lavarout pegen mallus ez eo sevel ur greizenn gelenn evel hini Sant-Enda e Breizh (pe zoken er-maez eus Breizh, ma n'eus ket tu d'ober e-giz-all, en Iwerzhon pe e Kembre) e-lec'h e vefe diorreet hor mibion diouzh spered hor gouenn evit ar stourm hon eus da gas da benn..."

Kervorc'h

R. Meur a arnod a zo bet kaset da benn e Breizh hogen n'int ket deuet da vat. Er mare-mañ o klask SKOL AN EMSAV bezañ ar greizenn stummañ a c'houlenn hor c'henskriver.

BODADEG VRAS AR C'HEVRE KELTIEK

Bodadeg vras ar C'hevre keltiek a zo bet dalc'het er bloaz-mañ d'ar 16-18 a viz Here e Truro ha Redruth, Kernev-veur. Dileuridi eus ar c'hwec'h skourr broadel a oa eno, gant ugent pezhriad bennak eus Kernev-Veur hag unnek eus ar broioù all. Ne oa ket kement a dud ha warlene e Dulenn. Diaes eo atav en em glevout a-zivout un deiziad o tereout ouzh un toullad mat a dud war un dro ha d'ar mare-se eus ar bloaz, ar re na vezont dieub nemet da sadorn ha da sul n'o dije ket bet amzer d'ober ar veaj hir-se.

Dre vras, koulskoude, ez eo bet ur c'hendalc'h talvoudus. Me 'gav din hon eus lakaet ar c'henlabour politikel etre ar Galted war un diazez startoc'h peogwir hon eus en em glevet war vonreizh ugent kraf. Ouzhpenn-se hon eus brastreset al labour da ober e-pad ar bloaz a zeu.

EN DALC'HAD KENTAN, D'AR GWENER ABARDAEZ

Ar vodadenn gentañ a oa d'ar gwener abardaez e maerdi Truro. Hor mennad a oa bet kaout ur vreutadeg foran war an destenn : "Ha mat pe fall ar C'henvarc'had evit ar broioù keltiek?" Padal ne voe ket ragaozet an traoù e koulz. Goulennet e voe digant pep a zilériadi dre Skourr displegañ e peseurt par emañ degouezhet an Emsav broadel en e vro ha peseurt kefridi a zo dezhañ da seveniñ en daou pe dri bloavezh da zont. Tro a voe roet neuze d'an tregont den a oa eno d'ober goulennoù, e sell da zeskiñ muioc'h diwar-benn ar pezh a c'hoarvez er-maez eus o bro-int. Lezet e voe ar gendael da badout re gant pezh a denn da efed an droiadouriezh war hor pobloù ; Kerneviz a oa eno ha ne blijas ket dezho klevout Padraig O Conchmir oc'h ober 'gastaoerezh' anezhi. An darn-vrasañ avat a oa a-unvan evit anzav e tenne ar Gumuniezh Armerzhel Europat da gengreizañ ar c'henderc'hadur gouezel koulz ha greantel endro d'ar rannvroioù poblet stank hag e chomfe an droiadouriezh unan eus pennelfennoù buhez armerzhel hor broioù-ni. O vezañ a-hend-all ma tenn ar C'henvarc'had da bellaat kreizenoù ar renerezh politikel hag an diferezh armerzhel e vefe diaasaet deomp kaout krog ha levezon war ar re a vo ganto an emell eus buhez hor pobloù. A-benn ma vez

komzet c'hoazh eus mennadurezh rannvroel ar Gumuniezh a zlee talvoud da ziorren ar broioù isdiorroet ; al lañs roet a-ratozh kaer d'an embregerezh dieub gant ar C'henvarc'had a ya a-enep d'ar stourm evit lakaat ar galloud politikel e diraez ar bobl, evit isrzhiañ an armerzh da laz ar bobl.

BEUREVEZH AR SADORN a voe gouestlet da zanevelskridoù ar sekretourion -skourroù, o tiskleriañ stad an ezeladur, an arc'hanterezh hag an obe rerezh e-pad ar bloavezh tremenet. Kresket e oa niver an izili en Alba, Manav ha Kernev-Veur a ouzhpenn 50 %.

Un degemer a voe graet deomp e-pad un hanter-urvezh gant kadoriad Kuzul Kêr Redruth-Cambromn. Hemañ a lakaas evezh na vije gallet lavarout e oa unan ac'hanomp met tro o devoe Mebyon Kernow da zivizout gantañ diwar-benn aferioù Kernev-Veur, pezh a zo a-bouez evit ur Strollad hag a striv da zerc'hel tost d'ar bobl : "Ur c'hammed pe zaou hepken en he raok..."

En danevell e tiskleriañ e oa etre 1.200 ha 1.400 den war hor rolloù-izili hogen ne oa nemet 850 bennak o vezañ paet o skodenn hevlene. War-dro an hanter a oa e Kembre, ar re all o vezañ skignet er broioù keltiek all, e London pe e meur a vro all dre ar bed. En holl hor boa dispignet ouzhpenn 800 lur saoz, an hanter eus ar sammad-se o vezañ gouestlet da voulañ al levr-bloaz : "The Celt in the seventies". Ret e oa eta lakaat ar skodenn vloaz da 1 lur saoz da vihanañ - evit Breizh da 15 lur gall, en abeg d'ar mizoù-kas a zo uheloc'h. Evit ar skodenn-se e resev an izili pep a skouerenn eus al levr bloaz hag trimiziad CELTIC NEWS.

Divizet e voe lakaat ur pennad da vihanañ e pep hini eus ar yezhoù keltiek el levr-bloaz hiviziken. Ne dalvez ket d'ur c'henurzhiadur etrekeltiek embann er yezhoù keltiek hepken : ne vefe koulz lavaret nemet Brezhoned o lenn ar pennadoù brezhonek, da skouer. Ar pennadoù e brezhoneg a zle reiñ stlenn d'ar Vrezhoneg diwar-benn pezh a vez graet pe meizet er broioù keltiek all. Hag evel-se evit ar yezhoù keltiek all. Kavout a ra Kembreiz ha re all abeg peogwir ne vez ket a c'halleg el levr-bloaz nag e CELTIC NEWS. N'eo ket en abeg maz int a-du gant ar galleg, met en abeg ma ne fell ket dezho reiñ harp

d'ar saozneg da vout anavezet evel yezh an darempredoù etrevroadel pe washoc'h c'hoazh, hini an darempredoù etrekeltiek. Divizet e voe gouenn ouzh an izili, re Vreizh pergen, hag a-du e vefent evit lakaat ur pennad e galleg el levr. Tri doare a vefe da vihanaat lec'h ar saozneg : deskiñ da vihanañ ur yezh keltiek all estreget e hini (e sell da se, reiñ kentelioù dre gomz ha dre lizher) ; ober gant ur genreizhad-troerezh ur bodadegoù (pelec'h avat kavout an arc'hant hag an ampartiz ?) ; embann an holl bonnadoù er yezhoù keltiek, gant un diverrañ e saozneg pe e galleg. Kement-se holl a c'hellfe bezañ graet ma vefe muioc'h a dud oberiant o komer perzh er C'hevre, muioc'h a arc'hant, muioc'h a amzer. Da c'hortoz, lennit pennad Goulvenn Pennad el levr-bloaz 1970... evit habaskaat. Forzh penaos, Breizhiz n'emaint ket diwar-lerc'h er strivad da dostaat ouzh ar yezhoù predenek all da vihanañ.

Goulennet e oa bet ouzh ar C'hevre keltiek reiñ harp da Euskariz a oa da vezañ barnet gant ul lez vilourel e Burgos e deroù miz Du. Estreget degemer ur mennad o tamall da c'houarnmant Madrid e waskerezh en Euskadi e voe divizet skignañ danvez pennadoù da embann er c'helaouennoù pemdeziek, aozañ bodadegoù ha kas dil-euriadurioù da glemm ouzh kannaded Spagn. D'ar mare ma skrivan emeur o prientiñ al labour-se.

D'ar sul endervezh e voe breutaet testenn ur vonreizh evit ar C'hevre. Diazezet eo war skiant-prenañ nav bloavezh a genober etrekeltiek ; enni ez eo spisaet pal ar C'hevre, kargoù hag emelloù izili ar C'huzul-kreiz hag ar Strollad-sevenañ, hag an doare ma vezont anvet pe zilennet.

Kinniget e voe gant Anthony Edwards, sekretour evit Kembre, imbourc'hañ ha tu a vefe da ginnig danvez-kannaded e dilennadegoù bras pe lec'hel e kêrioù bras maz eus divroerion eus eus ar broioù keltiek : dezho, ma vent dilennet, plediñ a-dost gant ezhommoù dibar an divroidi-se.

Kendalc'het e vo da seveniñ ar mennadoù degemeret warlene : dastum danvez evit ur c'henistor eus ar pobloù keltiek, reiñ atiz da gejadennoù sport etrekeltiek, harpañ an darempredoù etre tud yaouank an emsavioù broadel.

Monnadoù all voe degemeret : 1) o c'houlenn digant gouarnamant Lunden prouez gant an nijdennoù dreistsonel a-us d'an tir ; 2) oc'h enebañ ouzh serridigezh skolioù kentañ-derezh evel re Dun Chaoin (mervent Iwerzhon) ha Bryn Croes (Caernarfon) paz eo nozas da adsav ar yezh vroadel ha d'ar c'honstag etre an dud a vev endro d'ar skolioù-se; 3) o c'houlenn e ve azet gwazerezhioù -skinwel e pep hini eus ar broioù keltiek e reiñ ul lec'h azas da programmoù er yezhoù keltiek ; 4) o tiakuliañ rannidigezh ar broioù keltiek (c'hwec'h-kontelezh, Berwick Alba, Bro-Noaned, Gevred Kernev-Veur) evel un tu da wanaat ar broioù-se gwaheec'h hag o c'houlenn e vefe roet tu da Gerneveuriz da zivizout gant kefridiezh Bonreizhel Crowther.

Goulnnet e voe ouzhpenn digant gwazerezh-skinwel ar BBC aozañ programmoù evit reiñ tu da Gerneveuriz da zoskiñ kerneveg hag istor Kernev-Veur.

Evit kas e gefridi da benn en deus ezhomz ar C'hevre eus kenlabourha-harp-aro'hant an holl re a gred ez eo talvoudus startaat an ereoù etre ar Gelted. Bonreizh ar C'hevre a ro tu da gement hini a zegemer hor mennadoù-diazez da oberiañ er c'hemurzhindur. Ma kav dezhañ - evel ma kav da lod evel P.B. Ellis ha Seamus Mac a' Ghobhainn, - ned eomp ket pell a-walc'h, ned eomp ket don a-walc'h, n'omp ket dispac'hus a-walc'h, - n'en deus nemet dastum endro dezhañ tud a-walc'h a-du gant e vennozioù hag e c'hello pouezañ evel-se war emdroadur ar C'hevre. Rak n'eo ket hor mennad ober eus hemañ un dm riellet, met ur benveg padus evit adsevel ar Geltelezh.

Un arouez o skeudenniñ ar "skoulm keltiek", e doare La Tène, a zo bet degemeret evit arouez ar C'hevre keltiek. Skouerennoù anezhañ a c'heller kaout evit 2/ ar pezh (mizoù-post ebarzh) digant A. Edwards, 2 Clos Ton Mawr, Rhiwbeina, Cnerdydd, Bro-Gembre. Evit kaout diskl rindurioù, skouerennoù eus "The Celt in the Seventies", skrivañ da Jakez Derouet, 2 place Martray, 44-Naoned (K.R. 3264-47 NAONED)

DANVEZ
UR STATUD
EVIT
BREIZH

Moulañ a reomp da heul un "danvez statud" evit Breizh a zo bet kaset deomp nevez zo gant brogarourion eus Sant-Brieg. Moulañ a reomp ar skrid-mañ vel un diell hepken rak

n'emañ ket stourmerion E.B.V. a-du gant un obererezh hengounel a seurt-mañ. Displegañ a raimp perak da heul ar skrid e unan, hep mennout evit se digalonekaat ar Vrezhoned o deus boulc'het an oberiadenn-mañ hogen evit displegañ peseurt hent hon eus dibabet ha perak hon eus dibabet anezhañ. (1)

Perak ?

Ur pcont a zo m'en em glev an holl Vrezhoned diwar e benn : ret mat eo adaozañ ar "rannvroioù", an tachennoù a zo dindan beli Stad Frañs. Kement kostezenn bolitikel gall a zo, adalek ar P.S.U. betek an U.D.R., ar C'hambroù-kenwerzh hag ar C'hambroù-labour-douar, ar sindikadoù hag ar breuriezhoù-micher a bep doare a c'houlenn kement-se. Studiet eo bet, goulnnet hag ade'houlennet ganto hag ivez gant ensavadurioù ofisiel evel ar c'HOODER hag ar CELLE, ar c'huzulioù-parrez, ar burevioù "evit pinvidiaat an eko,omiazh" ("Comités d'expansion économique") a zo bet krouet o pep lec'h e Breizh.

Docust d'ar Vretoned bezañ lavaret sklaer o youl n'eus bet adnevezet netra er "rannvroioù". Ar Stad kreizennet ne fell dezhañ na fiñval na plegañ ha kaer a zo cheñch gouarnamant, kreizennet eo ar Stad, kreizennet hag aheurtet e chom. Renet eo pep tra gant ur bodad "nerzhioù-sparlañ" o deus graet o mestr war ar gouarnamant a drugarez da Napoleon (en eo a greizennas ar gouarnamant hag ar burevioù). Ar burevioù hollc'halloudek a ra o mistri war gement "sitoian" a zo dindano ; ur gwir ziktatouriezh ez int, o waskañ war ar politikerezh, ar verouriezh, an ekonomiezh, ar gevredigezh hag ar speredoù.

Breizh ha Breizhiz eo a c'houzañv ar muiañ. Int eo a c'houlenn holl ha pep hini anezho perak ne lezer galloud na frankiz ebet ganto da ren o flanedenn o unan ? Perak ne grouer ket Kambroù pe Guzulioù e pep rann eus Stad Bro-Frañs, a vefe anvet an izili anezho gant ar bobl, evit lakaat urzh i o unan en o aferoù o unan, hep ma vefe dalc'hmat ret plegañ d'ar pezh a vo divizet (mat pe fall) gant gouarnamant Paris, hag hep ma vefe dalc'hmat e vurevioù o furchal e pep tra.

Ma ne vez ket graet, penaos e vo gallet a-hend-all sevel pinvidigezh hag aez-bevañ e Breizh ? Penaos e vo parset kleñved an divroañ, a zo glac'har ha rivin an holl ? Penaos e vo adsavet enor, yezh ha pinvidigezh-spered hor pobl ?

Ma oar kement Breizhad a zo pelec'h emañ an droug n'en em glevont ket holl war al louzaouñ... Emañ darn e sell e tsuio ar silvidigezh pe gouezho ar galloud etre daouarn o c'hostezenn...

(1) Ar skrid-mañ a zo bet moulet dres er stumm n'eo bet kaset deomp gant aczerion ar c'houlennadeg, e brezhoneg. Lezet hon eus ar gerioù implijet ganto.

pe e vo savet ur gouarnamant disheñvel diouzh an hini a zo bremañ. Ne soñjont ket ne dalv da netra treiñ penn d'ar vazh pa chom ar memes hini dindan an taolioù!

Darn all, daoust ma en em glevont war natur an droug hag an abegoù anezhañ, a sav disemglev etrezo o klask gouzout pe gant ar Varksourion pe gant ar Capitalourion emañ al louzoù a yec'hed.

Ne vern pegement a youl vat o deus an eil re hag ar re all, arabat dezho ankounac'haat kement-mañ : n'eus forzh peseurt liv gouarnamant, na peseurt mennoziou politikel (marksour pe gapitalour) a vefe diazezet warno ekonomiezh Frañs hag Europa - na Breizh, na broad na rannvro ebet na pobl war an douar ne vo diwallet o frankiz, miret o buhez ma ne vez ket e penn pep hini anezho frammoù politikel, merouriel, sosial, kulturel EVITO, KARGEZ EUS O AFEROU, evit herzel na vefent nasket hag hualet ha graet dezho plegañ dindan kement "oukaz" a vo taolet warno gant Burevioù a ziabell, gant teknokratad dianav hag hollc'halloudek evel rouaned, ha gant ur Stad kreizennet evel maz eo hini Bro-Frañs.

Kentañ tra eo ret ober eta eo dont a-benn da c'hounit ar frammoù politikel ha merouriel a zo ret da gaout a-benn gallout diwall, difenn ha gwellaat stad Pobl ar Vrezhoned. Hep dinac'h hini ebet eus o c'hredennoù, hep dilezel netra eus ar mennoziou o deus dibabet, hep paouez gant hini ebet eus ar stourmadou ekonomikel ep pe sosial, ar Vrezhoned holl a c'hell hag a zle en em unañ war ar pep brasañ evit ma c'hell Breizh, ne vern petra a c'hoarvezo er bed, sturianañ hervez he galloudegezhioù he flanedenn hag he buhez da zont. Ret eo da Vreizhiz en em glevout endro d'ar Raktres-mañ evit ma vo heuliet ha doujet... Darn a gavo n'eus emañ nemet ar pep retañ, ar bazenn izelañ... darn all a gavo ez a pellañ ma c'heller mont. Holl avat e c'hellont en em unañ : un hent sklaer eo etrezek ur vuhez splannoc'h ha maoc'h a frankiz gant ma vo tavet war ar mennoziou disheñvel ha ma 'n em stardor evit gounit ar pep retañ ; peogwir, hepzañ, ne vo netra.

Setu perak, skuizh gant an tabouù politikel hag an emgannou mennoziou (eo bet, siwazh, dinerzhed ar Gelted ganto) ha lakaet ganimp en hor youl trec'hiñ warno evit ma tougo hor stourmad frouezh, Brezhoned zo o deus divizet kinnig d'o c'henvroiz da sinañ ha da harpañ an "Danvez-Statud evit Breizh" a ziskleir berr-ha-fraezh ar pezh a zo e youl hag e c'hoant kement gwir Vreizhad zo.

AR BUREV OBERIANT EVIT "UR STATUD EVIT BREIZH"

DANVEZ UR STATUD EVIT BREIZH

An danvez-statud a zo amañ da heul a bedomp pep hini eus hor c'henvroiz, a bep renk hag a bep stad, da sinañ, da vrudañ ha da harpañ. Heñvel eo, kerkoulz dre vras ghae a bep rann anezhañ ouzh ar goulennoù graet hag adchraet hanter-kant vloaz zo (ha dreist-holl abaoe 1950) gant ar C'huzulioù-departamant, ar sindikadoù hag ar C'hambroù michezel, ar c'hostezennoù politikel, ar breuzezhoù ha strolladoù kulturel a bep doare a zo e Breizh.

UNVEZH BREIZH. KAMEROU AR RANVRO. RENADUREZH AR RANVRO. FRANKIZIOU EKONOMIKEL, KULTUREL, MEROURIEL,

Heñvel eo ivez ouzh ar raktresoù nevesañ bet studiet, kinniget ha meulet gant konferañs Europat ar Galloudeù tachennel (eus Kuzul Europa). Lakaat a ray e penn Breizh frammoù diouzh ar bed a-vremañ, kar tost da re "rannoù" Bro-Italia, "Laender", Bro-Alamagn, "Republikoù" Yougoslavia, "Stadoù" ar Stadoù Unanet, "Proviñsioù" ar C'hanada. Emañ ivez emañ, adaozet diouzh ezhommoù ar bed a-vremañ, an divizadurioù hag ar frammoù pennañ a oa e LEZENN-DIAZEZ BREIZH, a oa federalour, hag a oa gwarez asur broad ha pobl ar Vrezhoned, bet prometet ha sinet gant Bro-C'hall da Vreizh pa voe skoulmet ar Feur a unaniezh etre an div vro.

Ar re a sin an "danvez-statud"-mañ a c'houlenn digant ar Vrezhoned dihun, digant pennoù ar gouarnamant, digant pennadurezhioù Bro-C'hall hag Europa, plediñ gant kement-mañ hep dale. Goulenn a reont ma vefe diazezet warnañ evit Breizh un adaozadur dre "rannvro" ha na vefe na reizh na fur delerc'hañ ur wech ouzhpenn.

A- WAR DACHENN AR POITIHEREZH, AR VEROURIEZH, AN ENSAVADURIOU.

- 1) Ra vo kroust, e framm bro-Frañs, da gentañ, e framm Europa goude ur STAD RANVROEL BREIZH gant he harzoù istorel.
- 2) Ra vo krouet ur GAMBR RANVROEL VREIZH, dezhi pep galloud da sevel lezennoù ha divizoù war an ekonomiezh, melestrerezh, kultur, spered, kudennou sosial hag arc'hanterezh, pa ne sellont nemet ouzh Breizh. Ar Gambr-mañ eo a savo budjed ar Stad rannvroel, a voto an tailhoù, a zivizo peseurt dispignoù a vo ret ober evit buhez ha mad pobl Vreizh. Evit pemp bloaz e vo anvet, diwar votadeg an holl, hag e vo enni, d'ar muiañ, kant ezel. Meur a wech ar bloaz en em vodo e bodadeg ordinal.
- 3) Ra vo savet ur C'HUZUL AN EKONOMIEZH, AR GEVREDIGEZH HAG AN DESKADUREZH, emañ tud dibabet (hervez un doare hag un niver da zivizout...) gant ar C'hambroù-kenwerzh, Labour-douar ha micherioù, ar sindikadoù micheourion, kouerion, kenwerzhourion ha stermourion, ar skolioù-meur hag an ilizoù, ar burevioù diorreadur, ha, dre vras, an holl c'halloudezhioù sosio-ekonomikel, speredel pe kulturel diazezet war zouar Breizh.
- 4) Ar C'huzul-se en em glevo gant ar Gambr rannvroel evit aozañ al lezennoù ekonomikel, sosial, kulturel, hag ar raktresoù ha ragaoadur a vo d'ober a-benn pourveziñ diouzh ezhommoù ha degas gwellaenn ar muiañ ma vo gallet war bep tachenn.
- 4) Izili ar Gambr hag ar C'huzul ne c'hellint ket bezañ war un dro izili eus Parlmannt Bro-Frañs pe Parlmannt Europa. A-raok pemzek deiz goude bezañ anvet, boaset o div en "evod-meur", ez anvint ur renadurezh pe C'HOUARNAMANT RANVROEL, un dak bennak a izili emañ. Ar c'hadoriad pe an eil-kadoriad a chomo e karg keit ha ma pado karg ar Gambr rannvroel a vezo kannaded ar Stad rannvroel dirak ar broioù divaez.
- 5) Savet e vo, hervez an doareoù displeget a-us, lezennoù pe reolennoù merouriezh, arc'hanterezh, ekonomiezh, kevredigezh ha kultur evit ezhommoù ha mad Breizh ha pobl ar Vrezhoned. Al lezennoù-se a vo lakaet da ren buhez ar vro gant ur verouriezh ispisial, a vo Brezhoned e karg enni hag er penn anezhi hag a vo dindan veli ar Renadurezh rannvroel hepken, hag hini all ebet.
- 6) Ra vo krouet ul LEZ RANVROEL AL LEZENN-DIAZEZ a vezo ul lezvarn verouriezh ha melestrerezh a renk uhelañ, beli dezhi war

Vreizh a-bezh, enni un ugent ezel pe war-dro, dibabet gant renadurezh ar rannvro en abeg d'o ampartiz. Evit o buhez-pad e vezint anvet ha ne c'hellint ket bezañ torret eus o c'harg. Ouzhpenn he beli hag he Barn e vo c'hoazh, dre ret, goulennet hec'h ali digant al LEZ RANNVROEL a-benn sevel al lezennoù, dekredoù ha divizoù aozet gant ar Gembr, ar C'huzul hag ar renadurezh rannvroel. En he c'harg e vo eveshaat daoust ha miret e vez da bep hini e wir hag e c'halloud : da stad ar rannvro, da bep tachennad-tud, - diouzh un tu - da Stad Frañs ha da Europa diouzh un tu all.

B - WAR DACHENN AN EKONOMIEZH, AR GEVREDIGEZH HAG AR SEVENADUREZH,

7) Ur RANNVRO LEDAN KORN OG AN ATLANTEL, beli dezhi war an ekonomiezh hepken, a vo krouet endro da greizenn Naoned-Sant-Nazer, Un ensavadur da frammañ ha da genurzhiañ ekonomiezh ar rannvioù an eil gant eben, e vo ar rannvro ledan-se. Ennañ en em vodo kannaded Stad rannvroel Breizh ha re ar rannvioù nesañ, evit kas war-raok dorn ouzh dorn un diorreadur ekonomikel ha sosial. Ar galloud a vo ret dezhañ evit ober ar pezh a vo en e garg, a vo fiziet ennañ gant ar stadoù rannvroel a gemero perzh ennañ. Int ivez a anv ar Comision-penn etre-rannvroel.

8) Stad rannvroel Breizh he devo eta, hervez an doareoù displeget a-us, ul lezenn-diazezh hag ensavadurioù hag a c'hello bezañ silet, hep bezañ adstummet, en un Europa federet pe gevredet. Hervez reolennoù ar federaliezh e vo urzhiet ivez e diabarzh ar vro an ekonomiezh, ar gevredigezh hag ar c'hultur. Krec'h-traon eta, war bep tachenn hag e pep renk, e vo diazezet pep tra hervez lezenn an EMREN, ar C'HE ER-PERZH, ar C'HENLABOURAT? en doare ma reno ha ma urzhio ar Vrezhoneg o unan hag o strolladoù naturel, buhez ekonomikel, sosial, kulturel, merouriel ha politikel Pobl ar Vrezhoneg..

9) Ar C'humunioù a vo tachennadoù-diazezh buhez ekonomikel, sosial ha kulturel pobl ar Vrezhoneg. Int, kerkoulz hag ar c'helic'hioù merouriezh, o devo frankiz en o renadurezh hag en o merouriezh, hag a zivizo petra d'ober gant ar c'hefiadoù-arc'hant a vo en o c'herzh. Galloud bras o devo, dreist-holl war dachenn ar pourveziadurioù-stad sosial ha kulturel ; war dachenn ar sevenadurezh hag lezennadurezh a gentañ derez, a eil derez ha micherel ; war dachenn urzhadur ar c'hêrioù, pourveziadur ar maezioù hag an aod, hentoù ar c'hêrioù ha re ar maezioù.

10) Divoredet e vo ekonomiezh Stad rannvroel Breizh, dreist-holl dre rannvroeladur ha dre verouriezh sosial tachennadoù pennañ an ekonomiezh, binvioù-meur ar produñ hag ar rouedad-bankoù, dre sturiañ ar c'henverzh hag al labouradegoù diouzh reiñ d'al labour-douar ha d'al labourerion-douar an diwall ispisial o devo ezhomm anezhañ, dre gas war-raok raktresoù da binvidikaat holl dachennad ar vro, dre wellaat an hentoù, an hentoù-houarn, ar porzhioù-mor hag an aerporzhioù, dre ober gwir implij eus hon aodoù digor war ar mor, gant skoazell ar pennadurezhioù gall hag europat.

11) Evit diwall ha kaereat ha kaernat sevenadurezh ha ha deskadurezh Pobl Vreizh e vo krouet ur gelennadurezh, ur skol-veur ur rouedad skingomz ha skinwel emren, frankiz dezho da ren o labour o unan, gant perzh ha skoazell ar pennadurezhioù rannvroel,

ar renadurezhioù tachennel hag an ensavadurioù prevez. Ar brezhoneg hag ar galleg, yezhoù ofisiel Pobl Vreizh, a vo kelennet e pep derez a skolioù Breizh ha frankiz a vo d'ober implij anezho e buhez ar Stad, ar verouriezh hag al lezioù-barn.

K - DIVIZOU EVIT BOULC'HAN AN URZHIADUR NEVEZ

12) An doareoù da seveniñ statud Breizh (evel ma eo bet raktreset amañ dre vras) a vo studiet ha divizet gant ar c'hentañ Kamb rannvroel, a vo anvet DIAZEZOURI. En he c'harg e vo diazezañ frammoù ar Stad rannvroel ha krouiñ ur politikerezh ekonomikel, sosial ha kulturel eviti. Pep galloud he devo evit breutaat war gement a vo d'ober hag evit lodenniñ al labour, ar galloud hag ar c'hargoù hervez ma vo ezhomm evit kas da vat an adaozadur, hag ivez evit en em glevout war an doareoù anezhañ gant kannaded a-berzh Stad Bro-Frañs ha pennadurezhioù Europa.

13) Da c'hortoz ma vo peurziazezet Statud Breizh e viro al lezennoù hag ar reoliadurioù a zo bremañ o zalvoudegezh. Ne vezint kemmet nemet tamm ha tamm, evit maz eor distrafulh eus an urzh kozh d'an urzh nevez. Penn ar verouriezh hag ar servijoù-stad er "rannvro" (nemet ar re a chomo dindan veli Stad Frañs pe Europa) a vo lakaet tamm ha tamm etre daouarn ar pennadurezhioù rannvroel. An "Englev europat war wiroù an Den" ha gwarez ar frankizioù pennañ, avat, a vo raktal roet talvoudegezh dezhañ e Stad rannvroel Breizh a-bezh.

14) Ur C'huzul ekonomikel, sosial ha kulturel "da-c'hortoz" a vo bodet raktal evit studiañ ha seveniñ ar pep retañ, war dachenn al labour-douar hag an ijinerezh dreist-holl. Divizet e vo ivez raktal petra d'ober evit kelenn ar brezhoneg e Breizh-Izel, evit kelenn istor, douaroniezh, sevenadurezh Breizh hag ar broioù keltiek en holl diez kelenn hag e pep korn a Vreiz (1).

E V E Z H I A D E N N O U

Moulet hon eus ar skrid-mañ a zo hir a-walc'h, evel un diell, e-giz m'hon eus merket endev. Kavout 'a ra deomp e ro un alberz eus pezh ez eo an obererezh breizhek abaoe ur pemzek vloaz bennak.

Lusket eo bet an embregadenn-mañ gant un nebeut stourmerion eus ar M.O.B. a oa bet ganet, evel ma ouezer, diwar-lerc'h ur c'houlennadeg all, heñvel a-walc'h ouzh houmañ, e 1957 - hini ar P.O.B. ("Projet d'organisation de la Bretagne"). Abaoe ar c'houlz-se ez eo aet ar M.O.B. da get koulz lavaret goude bezañ bet brudet e-pad ur mare, dreist-holl avat etre 1960 ha 1964. Adal ma vev savet

(1) Ar sinaturoù a zo dastumet gant an ao. Lusian Raoul, Penn-sekretour ar "Burev-Oberiant evit Statud Breizh", 21 Plasenn Gwesklen, 22 -Sant-Brieg.

an U.D.B. e 1964 avat ez eas an aozadur-mañ war goazhañ muioc'h-mui. Evel maz eo c'hoarvezet gant an holl aozadurioù breizhat abaoe deroù ar c'hantved-mañ n'eo ket deuet ar MOB a-benn da dremenñ teist da harzoù ar rummad war-lerc'h : bewech ma teu re yacuank d'an Emsav e savont o unan o aozadur hag an degouezhadenn-mañ a c'hellfe bezañ gwiriet o studiañ istor an "Emsav" penn-da-benn a c'houde 1898. Aozadur brezhon ebet n'en deus tizhet betek henn kemer pouez a-walc'h evit dedennañ ha derc'hel ar rummadoù nevez dre ma teuont war an dachenn bolitikel e Breizh. Bep dek vloaz eta - hag a-wechoù abretoc'h - e c'hoarvez un disrann bennak e kement aozadur brezhon a vez krouet el ledenez-mañ. Se moarvat a zo didec'hus e kement aozadur zo hogen pezh a zo grevus e Breizh eo ez a da get an aozadur alies en abeg d'an disrann-se. Ur seurt devoud, moarvat, a zo heuliadenn ur savelenn a gevredoniezh a c'heller stadañ en holl "strollouigoù" hogen ret eo anzav e chom difalonekaus daoust da se, rak diskouez a ra end-eeun n'eo ket bet an Emsav betek henn da vont en tu hont da saviad ur strollig hep nemeur a zarempred gant ar bobl hag hep krog ebet enni.

Bremañ e klaskimp reiñ hon ali diwar-benn intrudu diwezhañ stourmerion ar MOB.

Da gentañ, gweljust, e lavarimp e kavomp mat kement labour a c'hell lakaat Breizhiz da emouezañ ouzh "kudenn Vreizh". Darn a asuro e tenn seurt labour hepken da vreinañ ar spered gall e Breizh ; bezomp gwellwelour avat ha roomp dezhañ un dalvoudegezh yaus. Ouzhpennomp e c'houlenn un embregadenn a seurt gant houmañ ur striv dalc'hus ha pennek digant ar genurzhierion ha ne oufe hemañ bezañ disprizet ha dismagañset diwar skañv.

Evelato, o vezañ ma ne c'hell ket ar stourmerion vrezhon gwitibunan dibab holl an hevelep obererezh e tisplegimp berr-ha-berr perak e kav pacted E.B.V. gwell kemer hentenoù all evit seveniñ an uhelvennad broadel e Breizh.

Da gentañ e soñjomp ne zlefe ket ur stourmer klask

touellañ neb a glask gounit dre e vruderezh. Mard eo broadelour e Breizh e rank bepred displegañ dirak e genvroiz ur savboent broadelour, hag hini all ebet. O vezañ avat ma laka aozerion an "danvez Statud" ar ger "rannvro" etre askoù ez omp aotreet da soñjal ez eus anezho broadelourion e don o c'halon. Maz eo gwir, perak o deus diegi d'henn embann ? Ha ma n'eo ket gwir perak klask sikour ar vroadelourion ?

Hogen, a-benn ar fin, pe e vent broadelourion pe n'int, se ne vern ket rak ar reizhiad politikel a zo kinniget er skrid-mañ n'he deus netra da welout gant mennadoù ar vroadelourion : hini ar gevreadelezh (ar "federaliezh" evit implijout ger aozerion an "Danvez Statud") an hini eo a zo erbedet amañ ; ar reizhiad-se eta a glaskimp burutellañ eta evit diskleriañ perak n'omp ket a-du ganti.

E gwirionez, ma studier an istor, e veizer diouzhtu ned ebet ar gevreadelezh biskoazh nemet un hent hag ur bazenn war-du ar Stad kreizennet. Daoust hag ankounac'haet hon eus ez eo bet Breizh gwechall "kevreet" gant Bro-C'hall. Daoust ha n'eo ket anat a-walc'h hiziv disoc'hoù ar "gevreadelezh"-se ?

Ar skouerioù a gevreadelezh en amzer vremañ roet gant aozerion an "Danvez Statud" ne spiront ket a-hend-all. Touell eo hepken ar gevreadelezh e broioù komunour ar reter ; ar stadoù kevreet e riezoù an Unvaniezh soviedel, Tchec'hoslovakia, Yougoslavia n'o deus e gwirionez gwir rezid ebet o vezañ maz int unvanet strizh dindan beli ar Strolladoù komunour a zalc'h an holl c'halloud enno. Na Kroatia, na Slovakia, na Lituania ne c'hellont ren gwir vuhez vroadel ebet daoust m'o deus, evel ma lavarer, un nebeut frankizioù sevenadurel a vir ouzh o yezh a vervel re vuan.

Skouer Italia pe ar Stadoù-Unanet n'he deus talvoudegezh ebet kennebeut. Arstad Italiat he deus klasket diskoulmañ kudennoù a velestrerezh hepken o sevel munnvroioù (evel ma klask ober hiziv ar Stad c'hall hec'h unan gant ar rannvroekadur). N'eo ket dav komz, d'hor soñj, eus ar Stadoù-Unanet : hini ebet anezho

"'he deus na yezh, naq istor, na buhez vroadel ebet; unvezhioù mererezhel ned int ken, adarre. Kemendall a c'heller lavarout diwar-benn "Länder" ar "Bundesrepublik" : Bayern hoc'h unan he deus disoñjet un istor ha n'eo bet biskoazh un istor broadel evel m'eo bet hini Breizh; hag evit kantonioù Suiz, kaer am eus prederiañ, ne verzan ket peseurt darempred a c'hell bezañ etrezo ha Breizh. Neuze, perak klask reiñ ar Stadoù pe an impalaeriezhoù da batrom da'r gevreadelezh a vefe da gempenn gantar Stad c'hall, sañset, war he ziriegezh. Petra, e kement-se, a zerefe ouzh Breizh ?

Aozerion ar c'houlennader a-hend-all a c'houlaka daou zvoud ha n'eus ket anezho : 1) e vefe ar Vrezhonez o unan a-du gant ar gevreadelezh; 2) e vefe ar C'hallaoued, ivez, hag Europiz a-du gant ar gevreadelezh. Moarvat ez eo ar gevreadelezh ur gelennadurezh kaer meurbet hogen chomet eo betek henn e par ar c'healioù; e neb lec'h n'eus bet klasket lakaat da dalvezout da vat pennaennoù ar gevreadelezh wirion; dav eo krediñ eta ez int dibloustrek a-grenn, da vihanañ er sevenadur a zo o ren bremañ. N'eus a-hend-all strollad nag urzhiadur kevreadelour ebet e Bro-C'hall nag en Europa. N'eus, betek hiziv, nemet bodennoù bihan, oc'h ober bruderezh evit mennad un Europa kevreet, hep nemeur a c'hred peurvuiañ. Ha pa vije ur Strollad kreñv e vije ket dezhañ bezañ dispac'hel ma fellje dezhañ kas da benn e vennadoù. Diouzh ar skrid hon eus embannet avat ez eo sklaer ez eo ar gevreadelourion, ken e Breizh ken er broioù all moarvat, kempennelourion seven leun a youl vat; gortoz a mont ercunvezadur o mennadoù diouzh furnez mistri ar galloud e Breizh hag en Europa.

Hogen lakaomp zoken e teufed a-benn da sevel, egz ma c'hoanag meur a hini, un Europa "kevreet" un dez bennak er rannved-mañ : kredapl eo ne vefe an Europa kevreet-se nemet un impalaeriezh ouzhpenn, kreñvoc'h hag efedusoc'h eget an hini c'hall a zo gwall goazhet hiziv an dez hogen ha vefe ket kalz muoc'h chalet gant ar broadoù bihan eget an hini c'hall.

Ha lakaomp adarre e vefe darev mistri Vro-C'hall pe Europa gevreet da aotren un "dezvad" kevreadel" da Vreizh, - ne gav ket deomp e kemfe kement-se netra e saviad gwirion Breizh evit daou abeg:

1) ar veli vrezhon kevreadel ne vefe nemet un ez-veradur eus ar galloud gall pe "europat"; dre se ne vefe netra broadel ennañ ha Breizhiz a chomfe bepred Gallaoued pe a zufe da vezañ Europiz, hep istor na broadelezh ebet dezho o unan; ur Vreizh empret ouzh un unvezh politikel dreist dezhi n'he defe bezoud gwirion ebet.

2) Ouzhpenn-se, ar re a vefe atebek eus ar mererezh kevreadel e Breizh ne vefent na stummet gant an Emsav na dileuriet ganto; dre se e vefent Gallaoued pe "Europiz"; ha ganto e sankfe Breizh donoc'h c'hoazh en estrenekadur.

Moarvat, ne gav ket deomp e vefe diaesoc'h labour an emsaverion dindan hevelep renad, er c'hontrol : aescoc'h e vefe. Krediñ a reomp hepken n'eus chañs ebet e vefe tizhet ur seurt dezvad evit Breizh war verr dermen en amplegoù a vremañ; hag ivez, ne servije an dezvad-se hag hi aotreet, e nep doare, da ober eus Breizh ur wir vroad, ar pezh a zo koulskoude pal an Emsav. Dre se se ivez ne dalv ket ar boan forañ strivoù ar stourmerion en ul labour ha na c'hell dougen frouezh talvoudus ebet.

Ne ziogelomp ket evit keloù se n'eus ket tu da empennañ ur stumm bennak a gevreadelezh en Europa da skouer, en un dazont pell. Hogen kement-se, a adlavaromp, n'eo gallus nasevenadur er c'hendegouezh politikel a vremañ : an diorren, hag an ijinerezhañ diharz zo liammet ouzh impalaerelouriezh ar bloc'hoù a zo o reoliañ rannvedoù a-bezh; ar pezh a c'hellomp spiañ hepken evit ar poent eo distardañ an ereoù a zo ouzh hor chadennañ penn-da-benn. E gwirionez ne vo tizhet ar gevreadelezh nemet en tu-hont da zispennidigezh ar stadoù a hengoun impalaerel

hag en tu hont ivez da savidigezh riezoù bihan nevez kevatal o ment hag o galloud, oc'h en em glevout kenetrezo evit kempenn o armerzhoù hag o emzifenn (komz a reomp eus emzifenn gwirion, ar pezh a lavar dilezel an armoù hollzistrujus a zo e piao an impalaeriezhoù). O vezañ ma ne vo ket tizhet ar pal-se diouzh-tu ne c'hell Breizh evit ar poent, evel ma venegemp bremaik, kaout nemet un amkan : gounit saviad ur riez par he gwirioù da re riezoù all ar c'hevandir-mañ, o c'houzout ne vo ur gevread c'hall pe europat en degouezhennoù a vremañ biken nemet un impalaeriezh nevez, heñvel mik ouzh an impalaeriezhoù all o deus mannet ar bed etrezo ; ha ne rafe an impalaeriezh nevez -mañ nemet kreskiñ chañsoù ur brezel hollvedel en degouezhennoù -se end-eeun.

H.K.

LIZHIRI

"Emaon o tizoleiñ micher ar c'helenner ha plijus tre eo. Kentelioù a roon en eilvet klas, er c'hentañ klas hag e klas ar vachelouriezh : armerzh, gwir, jederezh, urzhiadurezh. Ouzhpenn 80 skoliad am eus, Mec'hikaned an darn-vuiañ anezho, plijus tre nemet re deodek, d'am meno, ha lezirek dre m'eo pinvidik o zieg-zhioù peurliesañ ha dre ma n'o deus ket d'en em chalañ re evit an dazont. Dinesterioù o deus eveljust evit ar galleg ha ret eo din bezañ ivez, en un doare, kelenner war ar galleg ... E gwirionez e choman souezhet o welout pegen tost eo Latinamerika ouzh Europa. Ouzhpenn 85 % eus poblañs Mec'hiko a zo indian pe hiron ha koulskoude en em santer kalz tostoc'h dezho eget da annezidi ar Stadoù-Unanet, marteze dre ma chomont war-lerc'hiet ? Ur vro is-diorreet tre eo Mec'hiko, daoust dezhi bezañ tost tre ouzh ar Stadoù-Unanet : 66 % eus al labourerion a zegemer nebeutoc'h eget 600 pesos evel gopr miziek (270 L.G.) ; ouzhpenn nav milion a Vec'hikaned ne oozont na lenn na skrivañ. 14 % eus ar boblañs a gerzh diarc'hen. . Kreskiñ a ra buan tre ar boblañs : 25,8 milion a annezidi e 1950, 50 milion hiziv. Dudius kenañ eo ar vro e meur e geñver. Broadelourion douet eo ar Vec'hikaned a zo lorc'hus kenañ gant o bro. N'eus ket a brezegenn gant un ezel eus ar gouarnamant hep ma vefe meneget an Dispac'h mec'hikan (1910-1921: ur milion a dud lazhet) a gendalc'h hervezañ gant ar gouarnamant a vremañ. Ur Strollad stadal a gever e Mec'hiko, ar Strollad Dispac'hel Diazezet (!!!) ha n'eus lec'h ebet evit ar strol-ladouigoù all int gouzañvet nemet evit Kinnig un neuz demokratel. An "Dispac'herion"-se o deus kaset ar "grand-roe" ("CRSed mec'hikar) e 1968 straedoù ar gêrbenn gant mindrailherezed (hervez tud eus kannadti Bro-C'hall e vije bet tost da 3.000 den lazhet)..."

J.A.B.

EMAÑ HON DAZONT E GOUELED AR MOR
gant Jakez ar BIHAN

Goleiñ a ra ar mor 72% eus gorread ar voull-douar da lavarout eo an darn vrasañ eus hor planedenn. Ennañ e chom kuzhet pinvidigezhioù divent ha n'int ket bet korvoet betek henn, nemet war-c'horre hag a-hed an aodoù : pesket-aerezh, holnerezh, istronezerezh, mesklonezerezh, bezhin-eosterezh, tennerezh ar skatil h.a. A-benn ugont vloaz avat ho devo kresket kalz poblañs ar bed ha daougementet e vo hec'h ezhommoù dour ha boued. Moarvat en devo kresket buanoc'h c'hoazh he greanterezh ha gantañ an abomm a zanvez krai hag a zanvez gromm. Rediet e vo an denselezh da glask mui-ouzh-mui he maradur e goueled ar morioù.

O vezañ maz eo hiziv un darn eus "Frañs" ne c'hell ket Breizh soñjal tennañ gounid eus ar binvidigezh-se evit diorren hec'h armerzh ha koulskoude he dije hor bro barreg-zhioù bras er c'heñver-se en amzer-da-zont. Ouzhpenn 600 kilometrad a aodoù a gaver en hol ledenez hag en he zro en em astenn dindan ar mor un uhelgompezenn gevandirel, ouzhpenn kant-mil kilometrad karrezek he gorread, elese teir gwech gorread Breizh hiziv. N'eo ket bet imbourn'het mat c'hoazh an uhelgompezenn-se met abegoù zo da gredif ez eus enni pinvidigezhioù divent evel e lec'hioù all.

Kement-se o deus meizet ar C'hallaoued nevez zo. E miz Genver 1967 o deus ar re-mañ eta krouet un aozadur arbennik, ar c'hC.N.E.X.O. ("Kreizenn riezal studi hag imbourn'h ar morioù") diazezet en hor bro un darn vras anezhañ. Roet e voe d'ar greizenn-se 32 milion a lurioù gall e 1968, 52 e 1969 ha 76 hevlens, pezh a c'helljed kavout dereat a-walc'h ma ne vije ket gwall zister e-keñver strivoù an Unaniezh soviedel, Japan hag ar Stadoù Unanet. Ar riez-mañ da skouer, a zo mannet da zispign - eus 1971 da 1980 -

8 miliard a zolarioù (da lavarout eo 44 miliard a lurioù gall - ouzhpenn hanter-kant gwech muioù 'h eget ar C'hall-aoued.) Ar Japan avat a zo, moarvat, ar vro aet ar muiañ war-raok war dachenn ar vorouriezh. N'eo ket souezhus pa ouezer pergen stank eo e boblañs ha pegen enk eo he gorread. ounezl ha pegen stag eo e armerzh ouzh enporzhiadur an danvez krai...

Ledan tre eo e gwirionez tachonn bleustriñ ar vorouriezh. Pledif a ra gant ar pesketaerezh, gant ar magerezh-loened-mor, gant ar gouezerezh isvorel ha gant korvoidigezh mengleuzioù isvorel. Unan eus diazezoù an armerzh hollvedel e vo moarvat ar morijineriezh warc'hoazh a-gevret gant ar stlennouriezh hag an derc'hanijinerezh. Gwelomp dre un nebeut skouerioù pleustrek ar sevenadurioù a c'hell ar vorouriezh degas buante en hor buhez pemdeziek.

Un hengoun kozh a besketaerezh a gaver abaoe pell e Breizh. Ouzhpenn 12.000 Breizhad a vev diwarnañ hag e Kornogeuropa o deus hor perzhier-pesketa evel an Orient, Konk-Kernev pe Zouarnenez ul lec'h dereat meurbet. Ur vicher griz eo hini ar besketaerion e Breizh ha ne dremen bloavezh ebet hep ma vije kollet bigi ha beuzet martoloded gant barradoù-amzer. Un obererezh henvoazel ha dornwezhrezhel e oa chomet betek ar brezel-bed diwezhañ ha c'hoazh hiziv e van korvoder ar besketaerion amreizh kenañ daoust da arackadennoù ar c'halvezerezh. A-wechoù e chom goull o rouedoù ; a-wechoù ne vezont ket evit mont d'ar mor en abeg d'ar gwall-amzer ha neuze ne c'hounzont netra ; a-wechoù all, en eneb, e tegasont kement a besked ma na gavont ket gwerzh dezho ha ma rankont o zeurel d'ar blodoù. Ouzhpenn-se ez eo bet korvoet ar binvidigezh-se en un doare ken dirac'ha ken gouez ma eo diviet hiziv lod eus stradoù ar mor, dreist-holl e kornogeuropa. Emañ seurtoù pesked zo o stuziañ prim : ar garliz, da skouer, a zo digresket a 20% abaoe pemp bloaz ar c'hementad pesketaet dezho. Ur gwa-terezh spontus eo eo bet re alies ar pesketaerezh rak na eo ket korvoet ar mor en un doare pealiek hep armerzhel. Divent eo

c'hoazh avat e binvidigezh rak priziañ a reer emañ er morioù 80% eus buhez loened an douar.

Ret eo ober eus ar pesketaerezh hiziv un ijinerezh greantel gwirion ha n'eo ket mui un doare kutuilherezh pe hemolc'herezh kentael. Abaoe ugent vloaz ez eo kemmet penna-da-benn an traoù, pergen gant ar radar hag ar sonar goude ar brezel hag hiziv gant an urzhiataerezh ("computers") ; fiziet ez eus bet, da skouer, en holl vigi o pesketa e pleg-mor Biskaia ur c'haier evit notennañ devoùdù niverus evel gwrez an dour el lec'h-mañ-lec'h, seurt ar pesked paket, o ment, o c'hementad h.a. Dastumet e vez ar stlenn-se dre skingomz ha pleustret dillo tre warnañ evit studiañ ha rakwelout divroadeoù ar bandennoù-pesked hervez froudoù ar mor, an amzer h.a. Er Stadoù-Unanet zoken e vez arveret un adplanedenn evit muzuliañ a bell gwrez ha feur-holen an dour-mor, - ha spiseat evel-se lec'hiaour gwirhevel ar bandennoù touned. En doare-se ne vez ken kollet amzer evit klask ar pesked evel gwechall ha mont a c'hell ar bigi-pesketa evel henn etrezek an tachadoù peskedus. Jedet o deus an Amerikaned o devoa arboellet en ur ober ur bloaz 12 milion a lurioù gall diwar 35 miliard a vizoù hollel.

Daoust d'o dreistelezh kalvezel n'emañ ket ar Stadoù-Unanet er renk kentañ ha kavout a reer dirazo Perou, Japan hag an Unaniezh Sovietel. Gant ar riez-mañ emañ brasañ strollad-listri ar bed ha morat endus warlene ul lestr a 43.000 tonenn "VOSTOK" a zo e gwirionez ur greanti war-neuñv, emañ a bep aurt ardivinkoù ha benvegijinnoù evit emañ pesked hag ober boued-mir ganto, temzoù pe aradoù spotikel. Emañ e keomp gant unan eus kudennoù armerzhel bras ar pesketaerezh. Kalz gwelloc'h eget gwerzhañ pesked fresk eo c'hoazh reif talvoudogezh d'an danvez krai-se dre e bleuskañ. Boued-mir a c'heller kenderc'hañ evel e Breizh abaoe ur c'hantved ; kreskiñ a ra boprad ar bev-sadur hag e c'handerc'hañ emañ daoust ma tigresek niver al labouradegoù (a z brasoù 'h eo

ar ro nevez). Kenderc'hadoù all a vo da ziorren ivez, evel ar pesket revet hag ar meuzioù keginet prest da zebriñ. Kement-se a vez graet dija gant embregerezhioù bras evel UNILEVER pe NESTLE (Findus) met plas a zo evit embregerezhioù all. Kruet en deus ar gouarnamant iwerzhonat un doare embregerezh -stad "ERIN" e anv kenwerzhel, evit arzañ ha gwerzhañ kenderc'hadoù ar pesketaerezh. Un embregerezh seurt-se a vefe da ziorren ivez e Breizh dieub ha gallus e vefe deomp ezporzhiañ kalz war-du nevidvaoù Europa pe Afrika, e-lec'h e chom izel c'hoazh ar bevezerezh pesked. A-hend-all, ur bern traoù talvoudus all a c'heller tennañ diouzh ar pesked, evel magadur chatal, temzoù rounezel, elfennoù evit ar greanterezh apotikel pe vagadurel h.a.

Adal bremañ e c'heller tremen eus pazenn an hemolc'herezh betek pazenn kalz spletusoc'h ar saverezh. Ne vo ket ar saverezh nevez-nevez evidomp o vezañ ma c'hounezomp istr ha meskl abaoe pell war adoù Breizh, - ha gouest ez eur hiziv da virout kranken, ligistri ha grilhed-mor e stankoù, evel e Primel, e-kichen Montroulez. Evel-se e vo tu da reoliañ ar c'hinnig ha, da heul, ar prizioù. Saveteet e vo seurtoù pesked o vont da get ha gwellaet e vo zoken ar seurtoù. Perak ne rafed ket gant al loened-mor ar pezh a zo bet graet gant an had-plant hag ar chatal ? N'eus nemet soñjal en diforc'h a zo etre ur vuoc'h dam-ouez eus Afrika pe Azia hag ur vuoc'h diorreet en un atant-skouer eus Danmark, da skouer. Lieskementet eo bet peder pe bemp gwech hec'h askorad a laezh, war-lerc'h imbourezhioù hir ha paradurioù ragoczet mat. Komendall a c'helle bezañ sevenet gant al loened-mor hag a-benn un nebeut bloavezhioù, moarvat, e vo tropelladoù morleuec'h dezv ha lart o peuriñ dindan ar mor e bae Douarnenez dindan evozhiadur sketus binvioù skinwel gourdon mat ouzh o c'hefridi...

Kement-mañ a zo estreget faltazi rak set tre war-raok er eo Japaniz war an dachenn-mañ, dreist-holl evit pezh a sell ouzh ar c'hrestaneged. Kenderc'h'het o deus e 1968 400.000

tonnellad a ligistri hag a vorgivri savet ebarzh stankoù hepken ha deuet eo a-benn o skiantourion da gaout kranken ha morgivri ramzel ha kalz spletusoc'h eta e pep keñver. Un ijinerezh askoradus kenañ eo bremañ e Japan ha postadurioù a zo bet graet anañ gant embregerezhioù bras evel Mitsubishi, Sumitomo, Hitachi, Mitsui ha Sanva. E Breizh en deus sinet ar CNEOX ur gevrat gant Skol-veur ar skiantoù e Brest evit studiañ saverezh ar c'hegilh Sant-Jakez hag ur gevrat all gant ar "Compagnie Générale Transatlantique" evit desavel morgivri a orin japanat e ledenez Kiberen. Saverezh ar sili a zo studiet ivez e Kerhostin... Dre ma c'houlenn seurt obererezhioù postadurioù bras n'eo ket Breizhiz evit tennañ korvo eus ar binvidigezh-se ; barrezehioù hor bro a yelo da greskiñ korvodurioù embregerezhioù estren hepan disterañ gounid evit Breizhiz. Ur Stad vrezhon a c'hellfe er c'hontrol diorren buan seurt ijinerezhioù ha krouiñ eta arc'huelioù ha pinvidigezhioù nevez en hol ledenez.

Ret eo menegiñ ivez an danvez krai a zo o kousket e goueled ar mor. N'eo ket bet furchet c'hoazh, evit gwir, kondon ar sichen revandirel tro-dro d'hol ledenez met e meur a vro er bed e klasker korvoiñ hiziv ar gweladegoù lec'hiet dindan ar mor a gendalc'h alies gweladegoù lec'hiet e kondon an douar-bras (glaou, e Norzh-Japan, tireoul e Kalifornia hag en Teksas,...) E 1968 e oa endev 16% (335mt) eus an tireoul hag an diraezhenn kenderc'h'het er bed o tont eus gweladegoù isvorel. Priziañ a reer e vo 22% an-erho e 1972 (585mt) ha 33% e 1978 (1.360mt). Pal ar c'houarnunehioù bras eo furchal er mor betek 500 metrad a sonder a-benn 1975 ha betek 1.100 metrad a-benn 1980. Gouzout a reer endev pezen pinvidik eo kondon mor an hant-mor pe hini plag-mor Mec'hiko. Siwazh, ne gav ket d'an douarourion, betek gouzout, e vefe tireoul pe diraezhenn e-kichen han adoù mat moarvat er eus tro-war-dro gweladegoù a zavezioù krai ken prizioù - "placers" e saozneg, enno stazh, houarn, seur pe argant gant fourioù uhel tre en abeg d'ar c'hendisp sanadurioù atizet gant an douar-mor.

Furchet mat e vez adal bremañ tro-war-droioù an Aostralia ha Japan evit dizoleiñ seurt gweleadoù hag ijinnet ez eus bet gant un embregerezh amerikan, DEEPSEA VENTURES INC., ardivinkoù gouest da sunañ danvez prizius e war strad ar mor betek 5.500 metrad a zonder, elese barrek da dizhout goueled an darn-vrasañ eus ar meurvorioù. Diouzh e du (gwall zister e-keñver kement-se) emañ ar CNEOX o sevel ur splujerez arbennik eus 255 tonnell evit furchal e goueled ar mor. A-benn bloaz e rank bezañ douret an "Argyronète".

Ne c'heller ket en ur pennad evel hemañ ober tro glok ur seurt danvez ec'hon meurbet. Emsaverion o deus kroget da labourat war an dachenn-se hag a-bouez e vo o labourioù evit Breizh. Ur gentel a c'hellomp tennañ avat adal bremañ. Lavraet ez eus bet deomp a-viskoazh gant hor mistri c'hall ne oa ket hor bro evit degemer ijinerezhioù estreget ar gounezerezh hag an touristerezh. Ar c'hontrol bev eo a zo diskouezet deomp gant armerzh bleunius broioù arall skorotoc'h o finvidigezhioù natur eget hor re. A-daol-trumm e tizoloer hiziv ez eo kalz brasoc'h barregezhioù hor bro, dezhi ul lec'hiadur a zoare war ribl ar meurvor, eget a greded betek henn. N'eo ket Breizhiz siwazh, evit lakaat ar pinvidigezhioù-se da dalvezout evit o bro. Un arguzenn ouzhpenn eo evit proñañ hon eus ezhomm eus ur gouarnamant brezhon e Breizh hag un arguzenn eo ivez evit diskouez e vo splotus armerzh Breizh warc'hoazh.

 DERC'HANIJINEREZH/"industrie nucléaire, STLENNATAEREZH/"informatique";
 GERIOU DIAES. Erbediñ a reomp start ouzh hol lennerion pourchas ar geriadur brezhnek-gallek nevez a zo bet embannet gant AL LLANM hag ivez ar geriadurioù skiantel ha kalvezel ez eo krog PLEDER da voulañ war fichennoù. Mar karer e c'heller skrivañ d'ar gelaouenn a strollo an urzhiadoù.
 P. GLEVGADOUR/Jeneral. P.264. EMOUEZAN/kemer skiant eus, dont da anavezout...
 P.265. RENNAD/douze-gouarn. DIORREADUR/kresk (armerzhel dreist-holl).P.266.
 RIEZ/Stad emveliek, dishual a-grenn hervez ar gwir strevroadel.P.267. DEVOUDAÑ/
 bezañ abeg da... BRLENTOU/gwiriou dreist da re ar re all.P.269/KIVANDIREL/ a dem
 d'ar c'hevandir (douar-bras)... KEALLAD/ "concepts". P.271/AZASANT/lakaat da
 glosañ. P.286/REIZHIAD/sistem. P.287/DIBLEUSTREK/na c'heller ket pleustriñ,
 lakaat da dalvezout. KEMPEENNELOUR/a glask kempenn hep distrujañ na sevel un dra
 bennak nevez (e politikerezh). P.288. ANELEGO/ Plegennoù, degouzhennoù. RANVED/
 tann eus ar bed. P.290.MESKLONEZEREZH/ Gounezerezh ar mekl. ISTRONEZEREZH/
 Gounezerezh an istr.P.292.PLEUSKAN/treuzfurmañ ur c'henderc'had. KENDERC'HAD/
 produad.P.293.KRESTENEGED/"crustacés"/P.295.KENDISPENNADURIOU/mour a zanvez kimiek
 oc'h en em zispenn evit kenderc'had un danvez nevez.

EMSAV AR BOBL VREZHON

Danevell obererezh

Skoazell Pobl Vreizh da Bobl Euskadi

Ur vodadeg foran a zo bet azoet gant E.B.V. e Roazhon e droù miz du evit brudañ stourm Euskadi ha lakaat anavezout an taol-nerzh a glask kas da benn gouarnerezh Franco er mare-mañ, o varn 16 Euskarad. C'hwec'h anezho a zle bezañ barnet d'ar marv hag ar re all da hir amzer toyll-bac'h.

Tri-c'hant den o devo kemeret perzh en emvod-se dalc'het d'ar sadorn 7 a viz Du er "Salle de la Cité". Un emsaver eus E.T.A. ("Euskadi Ta Azkatasuna" - "Euskadi hag he frankiz") hag ezel eus ar "C'huzul Euskarat a-enep d'ar gwaskerezh" a oa deuet da gemer perzh en emvod ; kemer a rae perzh ivez tri ezel eus E.B.V. hag un ezel eus J.E.B. Roazhon ("Jeunesse étudiante bretonne"). A-benn gwelout perak ez eus bet graet bruderezh gant E.B.V. evit Euskadi eo mat lakaat a-wel berr-ha-berr an darvoudoù hag an devoùoù a hiziv en Euskadi.

Abaoe un nebeut bloavezhioù ez eo gwashaet ar gwaskerezh a-enep da bobl Euskadi. Daou vloaz zo, an eil a viz Eost 1968, e oa bet lazhet rener ar polis politikel e Guipuzkoa, anvet Manzanos gant un emsaver eus E.T.A. Hemañ a oa e penn ar gwaskerezh hag ar bourrevierezh. Da heul an taol-se e teuas gwashoc'h an heskinerezh a-enep d'an Emsav euskarat ha dreist-holl a-enep da E.T.A. Harzet e voe 16 Euskarad tamallet dezho bezañ kemeret perzh e lazhadenn v'Manzanos. Bac'het ez int dindan an talbenn "teuliad Xabier Izco" rak hemañ eo a zo sañset bezañ bet e penn an taol-se ha kiriek dezhañ. Barnet e vezint gant ul lez-varn milourel, hervez al lezenn o tennañ d'ar "forbannerezh ha d'ar sponterezh". Hervez al lezenn-se n'eus ket ezhomm prouemoù evit barn. A-walc'h eo d'al lez-varn krediñ start ez eo kablus an damallidi ; ouzhpenn-se, an teuliadoù ne zegouezhont nemet 48 eurvezh a-rack dez ar varmedigezh gant ar vreutaerion. Dre se ez eo hogos dic'hallus dezho studiañ an teuliadoù ha ne c'heller ket gouzout ouzhpenn 48 eurvezh en a-rack pegoulz e vo barnet ar brizonidi.

En degouezh-mañ (gwelout ivez IMBOURC'H niverenn 10, pp. 244-257) ez eo krog emsaverion Euskadi da reiñ lañs d'un eneberezh

ouzh ar Stad spagnat en Europa a-bezh, dreist-holl dindan levezon ar repuidi euskarat o deus ranket tec'hout a-builh hag a zo krog da stigmañ ur rouedad skoazell etrevroadel. Savet ez eus bet e Paris ur "c'hKUZUL EUSKARAT A-ENEP D'AR GWASKEREZH" a stroll repuidi eus E.T.A., strollad Komunour Euskadi", "Strollad Komunour Spagn" hag ar Strollad miñherour sokialour spagnat. E bal a zo kenurzhiañ ar bruderezh hag ar skoazell liesseurt a glasker reññ da Euskadi ha d'an dud en toull-bac'h.

Ur galv da bobl Vreizh ha d'ar broioù keltiek a zo bet kaset gant E.T.A. ; darempredoù a zo bet skoulmet etre Breizh hag ar broioù keltiek all evit skoazellañ Euskadi.

E Breizh, goude bezañ klasket sevel ur C'hengor skoazell gant strolladoù breizhat all en deus E.B.V. divizet ober bruderezh dindan e anv da heul nac'hadenn ar re-se pe o direspont.

Bruderezh a zo bet graet eta evit ar vodadeg skoazell da bobl Euskadi e Roazhon gant traktoù er skolioù-meur, skritelloù e kêr, pennadoù er c'helaouennoù (O.T. : 4 linenn ; Breiz : ur pennad a-bezh).

An displegerion o deus komzet diwar-benn emdroadur istor Euskadi hag an Emsav euskarat er c'hantved diwezhañ hag er c'hantved-mañ, doareoù ar stourm hag ar gwaskerezh, degouezh ar brizonidi. Un ezel eus ar J.E.B. en deus lennet ur gemennadenn a-berzh e strollad a-du gant stourm E.T.A. evit ar frankiz hag ar sokialouriezh. War di foent ez eus bet pouezet evit reññ skoazell da bobl Euskadi ha mirout ouzh ar brizonidi a vezañ barnet d'ar marv :

- 1) ober bruderezh ;
- 2) skrivañ da diegezhioù ar brizonidi a-bonn o c'halonekat ha da lez-varn Burgos evit pouezañ war ar varnierion ;
- 3) dastum arc'hant evit tiegezhioù ar brizonidi hag an holl labourerion a ray ec'hwel da zeiz ar varnedigezh.

Da heul ar vodadeg e voe graet e voe graet ur gest hag an arc'hant daspugnet a voe profet da Euskariz.

Petra ' vo bremañ disoc'h ar bruderezh graet en Europa a-bezh hag ar stourmoù en Euskadi ? Nec'het e seblant bezañ gouarnamant Spagn da heul an trouz a zo bet graet ha nec'hetoc'h c'hoazh eo gant an emsavadegoù a c'helle c'hoarvezout en Euskadi, Galisia, Katalounia,

ha Spagn zoken... Ar varnedigezh a zlee bezañ graet d'ar 16 a viz Du a zo bet gourzezet betek sizhun diwezhañ miz Du ha marteze diwezhatoc'h c'hoazh. Evel Breizhiz ha kenstourmerion en Emsav etrevroadel ar broadou bihan en em gann evit o frankiz e rankomp ober koment a c'hellomp evit skoazellañ pobl Euskadi a zo o reuziañ ouzh ur prantad kriz ha pouezus kenañ evit he dazont. Diouzh o zu, Euskariz o deus prometet dere'hel soñj eus an harp a vo bet roet dezho.

Amañ da heul e roomp un nebeut teuliadoù :

- 1° Galv E.T.A. da Vreizh ha d'ar broioù keltiek ;
- 2° Kemennadenn kaset gant Kristenion Breizh ;
- 3° anvioù ha chomlec'hioù tiegezhioù ar brizonidi.

+++++

G A L V E . T . A .

Da nerzhoù politikel Breizh hag ar c'hevre keltiek a-bezh, da werin ha pobl Vreizh ha d'an holl bobloù keltiek !

Kendispac'herion ! Ur wech ouzhpenn e kouezh gwall ziktatouriezh ar glevgadour Franco war hor pobl ; ur wech ouzhpenn ez implij un nemeurveliezh he binvioù a vougerezh. Emsaverion dispac'hel "EUSKADI TA AZKATASUNA" ("E.T.A.") a zo war-nes bezañ barnet gant lezioù-barn milourel hervez lezenn c'harv ar "Forbanerezh ha sponterezh".

Ar c'hastizoù goulennet a zo :

- EDUARDO URIARTE ROMERO : ar marv ha 90 bloavezh toull-bac'h.
- FRANCISCO JAVIER IZCO DE LA IGLESIA, : ar marv ha 70 bloavezh toull-bac'h.
- JOAKIN GOROSTIDI ARTOLA : ar marv ha 40 bloavezh toull-bac'h.
- FRANCISCO JAVIER LA ARENA MARTINEZ : ar marv ha 40 bloavezh toull-bac'h ;
- MARIO ANAINDIA NACHIONDO : ar marv ha meur a vloavezh toull-bac'h
- JOSE MARIA DORRONSORO CEBERIO : ar marv ha meur a vloavezh toull-bac'h.

Ar c'hospoù goulennet a-enep da c'hwezek eus hor c'hileed war-nes bezañ barnet a genstroll etrezo 750 bloavezh toull-bac'h.

Kalz anezho a zo bet barnet dija diwar benntamalloù all. (Izco da 60 bloavezh ; Dorronsoro da dregont bloavezh toull-bac'h).

Ho kerverl a reomp da harpañ ar baotred-se, da ober bruderezh evit ar stourm enep-faskour ha da skoazellañ ar stourm o deus gwerin ha pobl Euskadi, dalc'hmat ha dreist-holl bremañ, kaset war-raok a-enep d'ar c'horvoerezh hag evit tizhout o emveliegezh.

Hag o vezañ ma c'hoarvezo e miz Du ar barnadennoù hag ar muntroù a glaskont seveniñ en ho pedomp da zont, mall warnoc'h, da greñvaat an displegadegoù a genskoazell evit hor c'hileed en dispac'h hag a-enep d'an diktaturiezh faskour.

Spi hon eus e teuy al liammoù a unvaniezh etre hor pobloù da vezañ startoc'h a zeiz da zeiz hag e vo diorreet gant ar stourm evit ar frankiz, an demokratelezh, ar sokialouriezh a zifennomp holl liammoù ur c'henober gwirion etrevroadelour etre gwerinoù ha pobloù Breizh, Iverzhon, Kembre, Alba ha gwerin ha pobl Euskadi.

GORA EUSKADI AZKATUTA!

Proleterion ha pobloù gwasket ar bed a-bezh, en em unanomp !

K R I S T E N I O N B R E I Z H H A K U D E N N E U S K A D I

Kristenion Breizh a zegas da soñj da Franco ha da bennad-urezhioù ar Stad spagnat lizher-meur Yann XXIII "Pacem in Terris" : "Den ne c'hell bezañ sujet gant galloudoù politikel estren d'e gevredigezh pe d'e genel."

Pelloc'h e lavar c'hoazh ar Pab : "Amañ e tloomp deferañ fraezh hag anat ez eo kement mennad politikel a vez o skoilhañ buhez ha diorreadur ar bihanniveroù ur gwall grizias ouzh ar reizhded gwashoc'h c'hoazh, pa vez o fal o c'has da get.

Peurazas ouzh ar reizhded avat ez eo ar striv a-berzh ar galloud foran evit erluskañ buhez ar bihanniveroù, e sigur yezh, sevenadur, hengoun, araezioù hag embregadennoù armerzhel pergen."

Petra a soñj Franco diwar-benn an destenn-se, eñ hag a laka enskrivañ war bezhioù-mouneiz ar Stad spagnat "Caudillo a-berzh gras Doue" ?

Kristenion Breizh a sav krenn a-enep d'an doare-se da vevañ ar relijion, hag a zo kontrol rik d'ar penn-sturiennoù ebannet gant ar C'hrist en Aviel : "En em garit an eil egile."

En anv kristenion an Emsav e c'houlenn kristenion Breizh ma vo dieubet an emsaverion euskarat ha ma vo graet outo hervez doareoù diazez ar reizhded. Goulenn a ra ivez da heul galv ar Pab ma vo daskoret da bobl Euskadi ar frankizoù hetet ganti, ma vevo dieub dindan daoulagad Doue, ha ma c'hell dre se enoriñ he c'hrouer.

Amañ dindan e vo kavet chomlec'hioù an Euskariz bet toullbac'het dindan an anv "teuliad XABIER IZCO". C'hwech'h anezho a zo goulennet ar marv outo.

Goulenn a reomp digant an holl kas ar muiañ ar gwellañ a lizhiri kalonekaat ha skoazell d'an tiegezhioù-se a c'houzañv evit rezid o fobl.

KENGOR EUSKARAT A-ENEP D'AR GWASKEREZH
EMSAV AR BOBL VREZHON

- | | | |
|---|---|--|
| SRES. ONAINDIA,
Amañ L.K.
Eibar (Guipuzcoa) | SRES. Echave
Casa Chopen
Barrio Acitain
EIBAR (Guipuzcoa) | SRES MANUELA ROMERO
DE URIARTE,
Domingo Beltran, 13
VITORIA (Alava) |
| SRES. DORRONSORO,
Atau (Guipuzcoa) | SRES. GOROTIDI
Pablo Gorasabel, s/N
Tolosa (Guipuzcoa) | SRES. GUEZALAGA
Carlos Larrañaga,
6 - 3°
EIBAR (Guipuzcoa) |
| SRES. AZPURUA
Bar Labatay
Deva (Guipuzcoa) | SRES LOPEZ IRASUEGI,
Gregorio Matico, 4 - 2° D
Bilbao (Vizcaya) | SRES. A. ARRUTI
Bar Alai
Zarauz (Guipuzcoa) |
| SRES. Carrera
Caserio eliseaga
ANEZQUETA (Guipuzcoa) | SRES. LARENA
C. Mendizabal, 21 - 1° D
SANTURJE (Vizcaya) | SRES. ROQUE ABRISKEFA
San Bartolome, 8,
Miravalles (Vizcaya) |
| SRES CALZADA
Caserio Echevar
Barrio Axpe
B Usturia (Vizcaya) | | |

ZELL DA EUSKADI - Euskadi he deus ezhom eus hor skoazell e-keñver hant ivez, evit harpañ an tiegezhioù hag ar stourm. Mic'hercurion Euskadi y harz-labour da zifenn an dud en toull-bac'h. Kasit eta an arc'hant niverenn K.R. : COURVES, Y. CCP RENNES 2 437 56, en ur venegiñ "evit adi war gein ho chekenn."

leskrivet gant ar gelaouenn N°CFEP 50 015 Ar mercour : Y. Ollivier

Faint, illegible text at the top of the page, possibly a header or introductory paragraph.

Second block of faint, illegible text, appearing to be a list or a series of entries.

Third block of faint, illegible text, continuing the list or series of entries.

Final block of faint, illegible text at the bottom of the page, possibly a footer or concluding paragraph.